



# bremañ

## DIWAN DERC'HEL DA STOURM !





# Lizhiri

## Stourm ha trec'h

Kenvroiz ker,

Emañ emañ an trec'h evit G.KABON ho peus embannet war golo "BREMAÑ" miz Ebrel ? Hervez ar pezh em eus lennet n'eus bet ger brezhoneg ebet barzh al lez-vern betek-hen.

Deuet eo Gilbert 'maez an toull-bac'h, gwir eo, met n'eo ket sur ne vo ket ret dezhañ mont e-barzh en-dro peogwir n'eo ket goulet c'hoazh disoc'h ar prosez. 'Vern penaos, mar d'eo bet ken pell en toull-bac'h raok mont d'al lez-vern e oa peogwir emañ o tifenn ar Brezhoneg, peogwir e felle dezhañ implij brezhoneg el lez-vern. Neuze e vefe bet chomet a-dreñv an nor evit netra ?

Daoust ha trawalc'h zo bet graet evit en difenn ? Tu a oa aze da c'hwazañ war an tan ha da ziskouez da Europa penaos e vez graet gant ar vrezhonegerien ; amzer ar simbol n'eo ket echu c'hoazh er vro c'hwec'hornek.

Ret e vefe d'an Emsav labourat muioc'h en Europa. Re greizennet eo spered politikourien Paris evit cheñch traou a sell sevenadur Breizh. Ret eo gwaskañ warnezhe dre ar politikerezh europat a zoujont kement. Met ar brezhoneg n'eo ket anavezet gwall vat c'hoazh en Europa, pa ne ouia ket ar pep muiañ eus an dud ez eus a Vreizh ! Met daoust hag e oar an holl e Breizh lez ez eus ar Brezhoneg ? Labour a zo ! Kalon vat da bep hini ac'hanomp evit derc'hel bev hor yezh.

Bernez er MOULLEG (HAFRSFJORD, NORGE) 26 05 90

## BREMAN

### Skoazell da Vremañ !

Goulenn a reomp digant hon lennerien klask koumananterien nevez da Vremañ. Bep an amzer e vez kaoz a sevel ur gazetenn divsizhuniek, pa n'eo ket sizhuniek. Sklaer eo ne vo biken tu da dizhout ar pal-se hep bezañ diazezet mat ar gazetenn vrezhonek nemet a ro keleier miziek d'ar vrezhonegerien.

Bann ar fin graet ar soñj ganin da sevel ur c'hasodig gant ur strobard kanaouennoù savet an holl anezho ganin, nemet ur barzhoneg dindan pluenn **Fañch ABGRALL** (1907-1930).

Enrollet e vo er Studio **LAGON BLEU**, Kerelkun 29690 AR FOUILLEZ (Pell. 98 99 66 78), etre 25vet ha 29vet a viz **Mezheven** ha peurechuet e **NAONED** (5/6 a viz **Gouere**).

Kampennet e vo ar sonerezh gant ar sonerien : Jean-Louis VALLEGANT (Sax), Gildas BEAUVIR (Gitar), Farid AID SIAMEUR (Bendir, taboulinoù), ABALIP (Gitar boud, taboulinoù, flaut), Patrig MOLARD (Uileean pipe), Patrig COLLET (Gitar), Yon GOUJÉZ (Gitar) hag ar strollad E.V.

Ma taufe c'hoant deoc'h da dañva en arak ar sonerezh pe da c'houzout hiroc'h, o'ch pedet da zont betek du-mañ ha degemeret e vout gant plijadur.

Gant va gwellañ soñjoù,

Bernez TANGI  
Ar C'hrann Vihan  
29690 Berrien  
98 99 96 03

## Labour-noz

"Panellou nevez zo bet laket e meur a groazherit war vord an hent a ra an dro da Gemper. Evel boaz n'eus anv ebet e brezhoneg warno. Ret e vo eta mont da vastarañ anezho", eme kevrenn Bro-Gerne Stourm ar Brezhoneg.

"Panellou nevez-flamm a zo bet laket ivez e kostez Kemperle ha Banaleg, e lec'h ar re a oa bet mastaret gant SAB. Finoc'h e vije bet lakaet panellou divyezhek diouzhtu, peogwir e vo livet en-dro ar re nevez-se".

Labour-noz evit SAB eta.



## Kemennadenn SAB

Ne vagonp ket huñvreoù war disoc'hoù an emgav a-zivout Diwan a zo hiriv e Pariz etre an Aotrou Jospin, Maodiern an Deskadurezh Stad, hag an Dilennidi Breizhat. Ne c'hell ket an emvod-se degas frouezh pa welomp emzalc'h ar Maodiern (sellout da skwer ouzh deiziad ha lec'h an emvod ; menegomp ivez n'eo ket bet pedet Diwan, da lavarout eo ar re gentañ a oa da vezañ pedet ...). Ne c'hellomp ket, ouzhpenn, kaout fizians en dilennidi ; darn vrasañ anezho n'o deus ket studiet an afer a-dost ; n'int ket bet gwelet ivez o stourm evit Diwan, nag evit ar Brezhoneg.

N'eus nemet un diskoulm politikel - war-lerc'h un divizet a vefe kaset en-dro e Breizh gant he zud e-karg a c'hello :

1° Echuñ gant an droukziforc'hañ a-enep d'hor yezh en deskadurezh.

2° Kas war-raok hor yezh war an holl dachennoù all.

Setu perak e c'hallvomp an dud da gas ar stourm war-raok evit difenn Diwan hag hor yezh.

# bremañ

## bremañ 106/107 ERRATUM



Pennad: **Kendiviz miz Even e Naoned aozet gant an UDB** : ne glot ket ar skeudenn lakaet war ar bajenn 11 gant an anvioù lakaet dindan (e-giz m'o deus merzet lod ac'hanoc'h sur-awalc'h). Setu amañ **Nelly MAES**, kannadez Volksunie Bro-Flandrez.

Deizadoù **GOUEL SINEMA**  
Douarnenez 90

## POBL PALESTINIA

19-26 a viz Eost

Na zisoñjit ket kas hoc'h anv m'ho peus c'hoant kemer perzh en devezhoù-studi.

(p.26)

## Koumananterien nevez

Tro ho po e-pad ar vakañsoù da welet ho mignoned, keneiled, tud ho familh ha n'anavezont ket Bremañ pe n'o deus ket bet tro da goumanatiñ c'hoazh...  
Merkit neuze o anv hag o chomlec'h amañ dindan. Kaset vo dezho niverenn a zeu Bremañ, evit mann.


bremañ 8, straed Hoche 35000 Roazhon



Anvbihan / ANV :	Anvbihan / ANV :	Anvbihan / ANV :
Chomlec'h :	Chomlec'h :	Chomlec'h :

## Srivit e-barzh bremañ

### Niv. 108



Kenskriverien e Breizh hon eus ezhomm. Bezit kenskriver(ez) da **vbremañ**  
Kasit, evit niverenn a zeu Bremañ, ho pennadoù, ho keleier, ho kemennadennoù (hag ho luc'hskeudennoù), a-raok an **20 a viz Eost!** Degemer mat a vo graet dezho!

## Justis evit ar Vretoned !



Ne 'z in ket amañ da skrivañ ur wech c'hoazh ar pezh oc'h boaz da lenn war **VREMAN** : amañ **DIWAN** en arvar, kenderc'hel 'ra Stad C'hall d'ober goap hag all... Gouzout a rit holl emic'hañs amañ ar skolioù Brezhoneg o c'houlenn en em glevet gant ar stad en hevelep doare hag he deus graet homañ gant ar skolioù all a gelenn en ur yezh all etreget ar galleg : SEASKA (Euskadi), CALANDRETTA (Okitania), SCOLA CORSA (Korsika) ha BRESSOLA (Katalonia). N'eus ket 'met **DIWAN** eta a zo laosket er-maez an traoù. Ken fall eo ar stad ma ranko **DIWAN** dic'hoprañ he implijidi e-doug an hañv ma ne vez ket diskoulmet an traoù.

Setu ma krog mat tud **DIWAN** da goll pasianted gant gwir abeg. Manifestadegoù zo bet un tammig e-pep lec'h e Breizh hag en o zouez unan e Landernee he deus bodet 2000 den. Dilennidi ar vro, a bep tu politikel, o doa kemeret perzh enni d'an 9 a viz Even. Abaoe zo bet un emvod e Pariz etre dilennidi Breizh (kuzul rannvro ha kuzulioù departamant) ha tud ministrerezh an deskadurezh. Netra vat zo deuet diouzh an emvod-se, setu ma kendalc'her da stourm war an dachenn : manifestadegoù, stankañ hentoù, skrivañ war mogerioù... Tud zo a zo bet


harzet ha gwallgaset gant ar polis zoken, dre m'o doa kemeret perzh er stourm : 2 e Brest hag 1 e Roazhon(\*).

Stourmadegoù all a vo, doare pe zoare hag un dra zo eo ret d'an holl kompren ur wech da vat : gant ar stourm eo e vo gounezet ! N'eo ket prest tud **DIWAN** avat da c'hortoz sioul e vefe serret o skolioù.

Gw. CARADEC

(\*) war ar golo : skolaerezh Gwitalmeza dalc'het en toull un novezh e Brest.

## Prezegenn Youn Bodenneg Prezidant Diwan



En e brezegenn, da geñver he 20 vloaz gant Kreizenn an Enklaskoù breizhek ha Keltiek e Skol-Veur Brest (01/90) e listage hor ministr breton :

*"L'identité bretonne à venir laissera s'exprimer les différences régionales qu'un état jacobin, comme a pu l'être l'état français, a parfois réduites au silence."*

*"Comme a pu l'être", kea, rak "bet ez eus bet un amzer, un amzer dremenet" (gwerz an 3 seizenn).*

Un amzer aet e-biou, ar pezh a ra aotre ha gwir D.Vittrrand da embann e Bro-Hungaria (miz Genver 90).

*"Là où elles se trouvent, les minorités doivent vivre dans la plénitude de leurs*

*droits"* (e-giz ar Vretoned e Bro-C'hall, lakaomp).

*"Le fédéralisme, en tous cas la décentralisation, et certaines formes de décision autonomes, constitue la seule réponse suffisante au problème des minorités"* (in Le Monde, 26 01 90).

(Er mod-se amañ an traoù e Bro-C'hall).

bremañ

Lavaret e rafen a-walc'h, e-giz Paotr Treoure en e gentel d'al louarn pesk' : "N'eo ket karget ar re fall, d'ober al lezenn d'ar re all".

"Bet ez eus bet un amzer", da bep hini da vuzuliañ pegen fraezh ar chefchamant deuet abaoe m'en deus bet Mitterrand diskleriet en oriant 9 bloaz 'zo :

"Le temps est venu d'un statut des langues et cultures de France qui leur reconnaissent une existence réelle. Le temps est venu de leur ouvrir grandes les portes de l'école..."

Da bep hini da vuzuliañ pegen frank'eo digor donou ar skol, chomet merklet o midurunu abaoe keit-all 'zo.

N'eo ket hor ministr an Deskadurezh a yafe da lakaat ur banne eoul outo, eñ a lavar en ul izher sinet gantañ da zilenndi Breizh o c'hedal e-giz Diwan respont abaoe 6 miz war ar goullenn ma vije goret hor skolaerien par da re ar skolioù all :

"Je souligne que la convention passée avec les autres écoles de langues régionales a pour effet de leur Interdire toute pratique pédagogique", ar pezh a lakaan da traeshañ, gwashañ ha spontusañ diskleriadenn a ve bet deuet biskoazh gant an Deskadurezh-Stad war

he c'hoant da derrañ, da bulluc'hañ ar skolioù Diwan, ha da vougan ene, spered, sevenadur ha personelzh ur bobl en ur viraout outl a skoliatañ he yaouankizoù en he yezh.

Aotrou Jospin, degas a ran soñj deoc'h ar pezh a lavare an aotrou Savary, bet ministr en ho raok (Montauban, 10 81) :

"Tout ce qui a été relégué, voire étouffé, de leur passé, de leur culture, de leur langue, doit reprendre ouvertement place dans l'environnement familial dont l'école doit apprendre à reconnaître les richesses pour la construction personnelle de chaque enfant".

Ar pinvidigezhioù-se, ho skol a nac'h deskiñ o anaout, Diwan n'ez eus bet ezhomm deskiñ dezhañ pere int !

Aotrou Jospin, degas a ran da soñj deoc'h ar pezh a lavar en e rakger testenn ur c'hinnig lezenn war ar yezhoù bihan sinet ganeoc'h :

"Ce ne sont pas de courtes mesures concédées, quiéques revêtant des formes plus subtiles qu'autrefois, l'action pour traquer, pour réduire et finalement étouffer définitivement les langues bretonne,

basque, occitane, corse, etc. se perpétue bel et bien par le fait même de leur exclusion de l'école ...

"... A la chasse systématique, ouverte, déclarée, dont nos langues étaient l'objet, s'est substituée une autre forme de répression insidieuse, camouflée, indigne d'un pays de grande civilisation".

Aotrou Jospin, lez ez oc'h an hini a oar c'hoari brav gant "un forme insidieuse, subtile et camouflée pour étouffer définitivement la langue bretonne".

Aotrou Jospin, n'ho peus ket bet ezhomm da zont en hor bro da gefher Kendalc'h ar P.S. e Roazon evit deomp gouzout e oa a'chano'c'h ur bourjin, da gaut outañ ar brasañ disfizians. Ho psered tort a wir ouzump a lakaat an disterañ kred ennoch.

Aotrou Jospin, n'omp ket evit degemeret nag evit gouzañ

- an dismegañs a ziskouezoc'h ouzh hor skolaerien pa faot deoc'h o lakaat war izeloc'h renk eget skolaerien ar skolioù all ;

- ar fae a rit gant hor yezh pa ne faot ket deoc'h e vije en hor bro skolioù en hor yezh d'hor bugale ;

- an dispriz a lakaoc'h war ar Vretoned, o dilanndi, o chuzulioù-meur pa ne respontoc'h ket d'ur goullenn emgav savet gant Prezidant Kuzul Meur Breizh (lizher d'ar 7 05 90) ;

- he c'hoant "subtile, insidieuse et camouflée", da lazhañ ene hor bugale dre gas d'o bez ar skolioù Diwan a'chan daou viz.

Aotrou Jospin, arabat deoc'h krediñ e vezomp troet da blegañ hor penn. Aze ivez ez eus bet un amzer dremenet. Mont a reomp d'hen diskouez deoc'h, disadorn a zeu e Landerneu, en ur meeting skoazell da Ziwan a veze dezhañ, 'm eus aon, m'ulc'h a bouez war hon istor eget n'en deus bet ho kendalc'h e Roazon, a ziskouez deoc'h, petra eo respont ar Vretoned da, e-giz m'eo daeuit gant emvod diwezhañ Kuzul Breizh, "le mépris avec lequel la Bretagne est traitée" (O.F., Télégramme, 22 05 90).

Echuiñ a ran gant gerveal an dud d'ar meeting a yelo ar gaoz ennañ gant :

- J.P. THOMIN, maer Landerneu.
-P. Le TREUT, en anv Kuzul Meur Breizh.
-J.Y. COZAN, en anv Kuzul Pen ar Bed.
-P. DENEZ, en anv Kuzul Sevenadurel Breizh.



bremañ 4

Gouel "Preder ha Plijadur"

Diaes e vez mont kuit eus ar gêr evit ar brezhoneg bep dibenn-sizhun : manifestadeg Mellac, Gouel Ar Brezhoneg e Karaez, avanifestadeg Diwan e Landerneu, ha Gouel Tregon... Se zo kaoz, sur a-walc'h, ne vije ket bet miliadoù a dud o tont betek Tregon evit Gouel DIWAN d'ar 16 ha 17 a viz Even diwezhañ. Diaes eo bet ivez ober bruderezh ar c'hazetennoù a soñje o doa

kaoz a-walc'h eus Diwan. Mat ! Ne ra forzh, aozet e oa dispar hag ar re a oa chomet er gêr o deus c'hwitet un dra bennak !

Kendivizoù : gant Cozan, hag all ...

D'ar Sadorn d'abardaez e oa bet ur c'hendiviz a-zivout "al liesyezhegezh en Europa", kaset en-dro gant Jean Marie

Bressand, krouer ar gazetenn "Le Monde Bilingue" hag ezel eus ar CMIEB(1) ha gantañ war al leurenn J.Y. Cozan, Kannad, eil Prezidant Kuzul Meur Penn ar Bed, Y. Bodenneg, penn Diwan, Anna-Varl Chapalain, penn burev Europa ar Yezhoù Minorelaet, ha Yann Guillamot, penn Kuzul Pedagogel Diwan.



Dedennus e oa stumm an diviz kaset en-dro gant Loeiz Guillamot, kazetenner, daoust da brezegenn Bressand kalz re hir : Maer Banaleg en deus roet sav-poent maer ur gumun ur skol Diwan enni. Diaes da gentañ, diazezet-mat war-lec'h o tegas un dra ouzhpenn d'ar gumun. Echuet en deus o lavarout "kavout a ran gwelloc'h gwelloc'h skol Diwan e Banaleg, eget er barrez e-kichen !" Testoù all ivez : ur c'helenner er skol stummañ skolaerien, ur skolaer eus Diwan, bet kuitaet gantañ ar skolioù prevez dre ma oa aet skuizh da roas gumun evit ar brezhoneg hep ma finvle un distiing an traoù. Ar pezh a roas tro da J.Y. Cozan da zisplegañ politikerezh Kuzul Penn ar Bed : ur steuñv ha yalc'hadoù evit ar skolioù prevez evit ma ne vefe ket tu d'ar renerien respont n'eus ket archant. "Ar brezhoneg a rank servij d'an dud evit bezañ en o aes da gentañ, n'eo ket ret gwiskañ ar pezh a reomp d'indan liveoù ar gouarn-archant". Anat eo ar c'homzou-se o deus plijet d'an dud ar sal : arguzennoù kentañ Diwan e oa 15 vloaz zo !

Da glozañ Loeiz Bocquet en deus lec'hiet ar stourm evit ar yezh en endro ekonomikel a-vremañ.

D'ar Sul vintin e oa un eil diviz gant G. Vermeis(2) hag a gas war-raok studiadennoù evit priziañ an

divyezhegezh. Plijet e voe tud ar vugale dre ma oa pleustrek an dispiegadurioù. Peadra zo da soñjal e kendalc'h ivez da labourat gant ar skolaerien, un dra vat eta evel disoc'h da zevezhoù Tregon.

C'hoarioù, kan ha c'hoariva.

Estonet eo bet, sabatuet zoken meur a hini o zizoloñ sal Tregon : brav ha plijus ha renket a-zoare evit ar gouel : standoù gant pep skol o tiskouez labour ar vugale : priajoù gant re Gempel, labour war an dour evit Lesneven, hag all ...

Barzh en deus graet ivez an diskouezadeg "BREZHONEG HA YEZHOU EUROPA" ha goullennet eo bet dija e meur a lec'h a Breizh. En ur sal all e oa tu da arvestiñ ouzh "Kenavo my love" gant Strollad ar Vro Bagan atav ken mat, hag ivez ar ganerien Mona Bodenneg ha Rêves de Gosses.

Ma, ur gouel gwirion, a lavaran deoc'h !

Elena Riou

(1) CMIEB Centre Mondial d'Information et d'Education Bilingue. (2) Psycholinguiste e Pariz.

BREZHONEG HA YEZHOU EUROPA 32 panell 1m x 1,40m gant testennoù brezhonek ha gallek luc'hskeudennoù ha tresadennoù liv kartennoù evit pep yezh. Panelloù diwar-benn : Breizh, Kembra, Iwerzhon, Skos, Oktiana, Katalonia, Euskadi, Bro-Friz, Elzas, Frioul, Slovenia, Sardinia, Korsika. -Ha diwar-benn politikerezh Bro-Chall a-zivout yezhoù Stad-Chall, Testennoù Europa ha 'pezh a vez graet evit ar yezhoù minorelaet. A challer feurmñ digant SKOL AN EMSAV 8 straed Hoche 35000 ROAZHON

bremañ 5

6000 den e Karæz

# Gouel Broadel ar Brezhoneg

Pevare gouel broadel ar Brezhoneg a oa e Karæz d'ar 1<sup>añ</sup>, 2 ha 3 a viz Even aozet gant **EMGANN** ha **SAB**. Deuet e oa ur barn tud etra, war-dro 6000, da gemer perzh en devezhoù stourm ha gouel. Tro o doa bet da selaou sonerezh a-bep seurt : rock, new wave, blues, jazz, sonerezh Galisia, lwerzhon ha Breizh evel-just, gant **Georges JOUIN**, **Pêr-Vari KERLOC'H**, **NEW DAZONT**, **E.V.**, **DEN**, **GWENDAL**, **LES PIRES** ... ha dreist-holl **GLENMOR** a gane aze evit ar wech diwezhañ hag en doa entanet an dud gant "Kan bale ARB".

Prezegennoù a oa bet ivez gant **EMGANN/SAB**, **DIWAN** ha **DAZONT** (kevredigezh studierien ha liseidi Breizh). Ur salad standoù a oa ivez gant holl kevredigezhioù politikel ha sevenadurel an Emsav.

Boued spered, boued stourm, plijadur e-leizh a oa er gouel. Un devezh kaer eta, evit Breizh hag evit ar Brezhoneg.

Gwenael CARADEC



### Goulennoù goude ur gouel

Setu ... Aet eo ar barzh meur diwar al laouenn-seriñ. Hennezh a oa e penn kentañ luskad ar ganerien vreizhek. Bouc'het-frank oa bet an hent gantañ a douradoù hag e begement noa bet meur a wech, abalamour d'e garantez evit Breizh, d'ur mare ma veze gweliet fall, ha brudet falloch c'hoazh, ar stourm evit ar vro. "An hini a zo lemm beg e deod a rank bezañ kaset kostez e benn", neketa ? Un toull a vo diaes da stankañ, ur plas dibar ha dispar a oa hini Milg. Chom a ra war e lerc'h, estregret ur stropad sonioù "klasel" diankounac'haus, ar son bolitikel nemeti eus hon amzer a-vremañ e brezhoneg : "Kan an FLB-ARB", a glevs me evit ar wech kentañ war-lerc'h un embann mennadoù libertar, marzus hag entanet, "Princes entendez-bien".

Setu ... Gwall nechet 'n em gavan un disterig goude Gouel Broadel ar

Brezhoneg : pet kaner a oa prederiet e sonioù nevez savet gant ar stourm evit ar vro hag evit ar yezh ? Gwir eo e soner hag e kaner evit reiñ didu ha dudi d'an dud, ken gwir all eo az eo un emzalc'h politikel kanañ e Brezhoneg ! Memestra ! daoust hag-er e vefe ivez melldorn savet an emsaverien un arouez a c'hiz kozh ? Piv bennak zo spontet gant kement-se avat, daoust ha prest da zifenn e santimañchoù demokratel gwenn-splann e vo er barn vo stankoc'h an daouarn astennet e mod ar faskourien er straedoù ? N'eus tamm diforc'h, a gav deoc'h ? Tud feuls 'z eus anezho holl emezit ? Tud a feson, eveljust, a blij dezho an urzh, kea ? An dra se a vir outo da gac'hat e-barzh o bragoù ha dreist-holl "pa reer gwag, ouzh ar rev e stag" ! Gant ar pennoù bras an hini omp pedet bremañ da vanifestiñ, toudoù ! N'eus ket gwelloc'h mignon

deomp eget Tonton o tifenn ar goprou izel ! An aotrou Doue a oar kalz gwelloc'h egedomp ar pezh a zo mat evidomp-ni, c'hwil 'oar deñ ! "Il faut renouer avec la faculté d'indignation" eme Kaspar-teil. O ! Cheyeyel ! N'eo ket gwir, freñ ! Permetet eo deomp neuze sevel uhel ar banniel ruz, hini "kas ar saout d'ar ger" moarvat ! Leueed a zo eus ar C'hallaoued, 'vez lavaret ! Daoust hag er e vefe oc'hen eus ar Vretoned ?

Gwelloc'h respont ne gavan ket me eget ur vouezh kozh ha dizalc'h o vel em c'hreiz :

"Poent eo stagañ Bretoned gant stourm meur ar vro !"  
"Souvenirs ! Souvenirs ! (\*)"

\* e galleg er skrid. Per Vari KERLOC'H

# Gouel Broadel Breizh

Gouel Broadel Breizh zo bet lidet d'ar Sul 10 a viz Mezheven e Ballon. Siwazh n'eo ket anavezet mat an devezh istorel-mañ gant ar Vretoned : **Nevenoe** a drechas ar Franked war tachen emgann Ballon er bloavezh 845.

Tud ar Vro (Baer ha Ballon) a gendalc'h bep bloaz da lidañ an devezh-se oc'h en em vodañ dirak delwenn Nevenoe diouzh ar mintin, hag oc'h aozañ ur gouel en endervezh war dachenn emgann Ballon.

## EUSKADI

### Paeañ ar polis

D'ar 26 a viz Even e oa **Xan Koskarat** dirak lez-varn engalv Pariz evit bezañ ezel eus "ur gevredigezh torfedourien" (Iparatarak, emezo). Gouenn a rae ar bolised e paeje Xan ar 74 000 lur e vije kouistet dezho selaou e bellgomz !

Kentel : keroc'h eget ma soñj deoc'h e c'hall koustañ deoc'h ho pellgomz e bro Gwirioù Mab-Den !

## Euskadi

D'an 30 a viz Mezheven e vo savet e Norzeuskadi ur Sindikad Etregumunel o vodañ an darn vrasañ eus Kumunioù ar vro.

An ensavadur politikel kentañ o vezañ savet eno e vo neuze. Ezel eo ar sindikad d'an Aozadur Sevenadurel Euskarat (hañvel ouzh hon "Skol Uhel ar Vro"), gant kevredigezhioù sevenadurel all.

### Prosez ur "Gudari"

"Muioc'h a dud zo bet lazhet straed Pannecau, e Balona, eget e Pariz, straed Copernic", zo bet lazet a lez-varn Pariz da geñver prosez **Santiago Arrospe** (Santi Postos), "war intrudu ar Stad Spagnol, ur stad sponterien, p'he deus graet muioc'h a walldaoù e Bro-C'hall eget n'eus forzh pe vro eus ar Reter Nesañ".

N'eo ket dinamm Bro-C'hall ivez, pa selaou pellgomzadennoù an holl stourmerien, pa vez ar polis o herzel tud hep aotie, pa vez siallet an taouad saitek aourvezh goude ar furchadennoù, pa vez galvet dirak al lez-varn un den n'eo ket bet klevet gant ar barnar-anklask en ur ober daou vloaz hanter, pa vez sinet aotroù-gouennata rakdeiziataet gant ar barn Legrand.

E Reter Europa e vefe "holvellaek" ur seurt bro. "Bro Gwirioù Mab-Den", er C'hornog.

"Stourm a ramp betek an deiz ma c'hounazimp ar gwir d'an emsavelañ" eme Sant.



### Breizh n'emañ ket da werzhañ !

Livet e oa bet tiez noterien ha marc'hadourien tiez e **Pondl**, **Ploerdud** ha **Gwern** e miz Mae gant eneberien d'ar gwezhañ-tiez d'ar Saizon. "Bzh not for sale", "Tan, tan, tan" a oa bet skrivet war ar mogerioù er parrezioù-se.

### Tarzhadenn

D'ar **Merc'her 20 a viz Mezheven** e oa bet laket da darzhañ burev-gwerzh an takad-tiez "Les Marines de Longchamp", e Sant-Luner e-kichen Dinazh. Correkaet e oa sevel an tiez-se en abeg da rekodoù an amezien dirak al lez-varn. Dre bellgomz ha dre lizher evit-doare eo bet embannet gant an ARB e oa kiriek d'an darzhadenn.

# Kuzulioù Sevenadurel



## Emgav kentañ e Roazhon

Evit ar wech kentañ eo en em vodet dilauridi kuzulioù sevenadurel Breizh ha Korsika hag ar servijoù a bled gant sevenadur ar vro e rannvroioù "Languedoc-Roussillon" ha "Midi-Pyrénées". E Roazhon eo bet aozet an emgav-se, etre ar 5 hag an 8 a viz Mezheven.

Kuzul Sevenadurel Breizh eo a zo bet gantañ an intrudu-se. E-barzh burevioù ar Rannvro eo bet dalc'het ar c'hendivizoù. An aotrou Le Tréut, eil prezidant ar chuzul-rannvro en deus kemeret perzh gant Par Denez, Prezidant Kuzul Sevenadurel Breizh, Jean-Louis Latour ha Tangi Louarn, eil prezidanted. Daeat e oa Prezidant Kuzul Sevenadurel Korsika, Jacques Fusina gant ar sekretour hag un ezel all; Alem Surre Garcia, karget eus ar sevenadur okitan e Midi Pyrénées a oa gant ur chuzulier rannvro hag Etienne Hamel e karg eus ar sevenadurioù okitan ha katalan e Languedoc-Roussillon. Skoazellet e oa an emgav-se gant Kumuniezh Europa hag Anna-Vari Ohapalain a gemere perzh en anv Burev Europa ar Yezhoù Minoreleat.

gelennouriezh hag an danvez-studi hag ar pezh a zo bet graet e Breizh en-dro da Ziwan da skouer.

En Okitania ez eus ul lennegezh kreñvoc'h eget e Breizh, hag e Korsika: degadoù a romantou a vez embannet bep bloaz, met distar eo niver al lenneerien ha ne gaver ket ur spered treset war an dazont.

E kement lec'h ez eus darempredoù diaes gant servijoù Ministrerezh ar Sevenadur, gant kreizennerezh ar skinwel. Evit Pierre Le Tréut "ne zlefe ket bezañ e Frañs, ur minister ar sevenadur". Bras a-walc'h omp da c'houzout peseurt sevenadur a fell deomp. "Ur minister evit ar Pourvezadurioù" a rankomp kaout hepken". A-du eo bet an holl evit studiañ penaos laakaat da vont en-dro ur skinwel evit arzoerien ha kroerierien ar pobloù hag ar rannvroioù. Taollet eo bet evezh eus ar mennadoù votet gant Parlamant Europa diwar-benn politikerezh rannvroel ar Gumuniezh.

Met ur gejadenn gentañ ne oa ken. Emvodoù all a vo bremañ evit donaat danvezioù 'zo, stankaat an darempredoù. An emgav a zeu a vo e Kêr Tolosa e-kerz miz Du 1990

K.S.B.

## Ur gouarnamant evit Korsika

Emañ Pariz o kinnig da zilenidi Korsika reiñ d'an enezenn ur statud speiel nevez, gant ur gouarnamant distag hag ur vodadenn dezhi galloud war ar paramanterezh an en-dro, ar c'hêrioù, an dezougen, an diorroadur ekonomikel, ar c'helasoù hag ar sevenadur. Ur statud emrenezhez avat ne vo ket, pa n'hell ket ober lezennoù. N'hell nemet laakaat al lezennoù (gall) da glotañ gant "gwirvoud an enezenn" dre ziferadurioù reoliñ. Un hent etre an digreizennadur hag an emrenezhez eta.

## Enebiezh ar c'hlanioù

Kenkent eo bet embannet gant an daou glan, MRG Giacobbi, mestr kreisteiz an enezenn, hag RPR Rocca-Serra, mestr an hanternoz, o enebiezh groñs, en anv "unvaniezh ar Republik". Evit ar PCF emañ "ezeladur Korsika d'ar vroad en arvar".

Evit ar vroadelourien eo ur c'hamed war-raok ar c'hingou graet gant Joxe, ministr gall an diabarzh, daoust ma n'eo ket anavezet c'hoazh korsikiz evel ur bobl.

Evit an ANC (Accolta Nazionale Corsa) e chall ar c'hannad-se tostaat ar pal, aotrouniezh pobl Korsika. Evit A Cuncoita e tenn ar gwellaennoù-se eus ar stourm emañ-hi o ran.

D'an 2 ha 3 a viz Gouere e vo kaoz eus kinnigoù ar gouarnamant e kuzul Korsika. Ul lezenn a zlefe bezañ votet gant Kamb' Pariz a-benn miz Kerzu.

Keleier hor bez eus stourm pobloù Katalonia, Korsika, Euskadi, hag all, dre ar c'hatzennoù a vez kaset dimp eus ar broioù-se. Kaset a vez dimp "EL PUNT", "U RIBOMBU", "ENBATA", a zo sizhuniek, hag un nabeud re all. Kanskriverien all a gas deomp pennaodù maredek.

Siwazh n'eo ket tra-walc'h.

Kanskriverien e Breizh hon eus ezhomm da gentañ. Dre ma vo unañ evit pep bro eus Breizh. Roñt hoc'h anv.

**BREMAÑ 8 ru Hoche 35000 ROAZHON**

# E-tal ar skramm



## SKINGOMZ

### Un abadenn nevez

D'ar 17 a viz Even e oa Gouel an Tadoù, krouet gant ur marichal gall, a gredan, hag a voe bachel gant ur jeneral a lided e c'halvadenn an daiz war-lerc'h.

D'an deiz-se eta e-keit ma oa ma gwaz o labourat el liorzh, e oan-me o peillat palatoz dirak skramm ar skinwel: labour sul, labour nul, eme lod. Ha kemend-all a c'haller larout diwar-benn abadennoù brezhoneg FR-strizh?

"Lina", gant Roparz Hemon e oa c'hoariet gant Gouilh'han Kervella ha Nikol ar Vourc'h, gwaz ha gwreg bemdez-Doue, a-hervez. Pa oa-ñ o sevel e zorn, prest da skeiñ ganti, e oan oñ en em c'houlenñ ha krediñ a rafe ober: anaout a ran meur a waz mestroniet, ha marteze ma hini, a oa o c'hortoz ur gentel bleustrek. En aner: gant Roparz Hemon e chomer un dereadegezh ha pa vefe kaoz eus an alkolegezh. Gwashoc'h a c'hoarvez e tiez Breizh, ki d'ober un dro da lezioù-barn da welet. Din-me n'eo ket gwellañ pezh-c'hoari Roparz Hemon bapred, ha ne brian ket nemeur ar c'hoariva filmet.

Goude debrñ ma fritez gant kig ha saladenn eus al liorzh, pa oa ma gwaz oñ ober e gousk goude kreisteiz, em boa sellet ouz an diviz diwar-benn al lennegezh gant Frañsez Favereau hag e gouvidi.

Da gentañ e oa Koulizh Kedez, evit e "g-Konchennoù Mamm-Gozh", ur blijadur e gwelout o tbonañ e gaoziou "awenet": e-skaoz roumouzezerzh ar re all da vihanañ, setu unan en deus traou da larout, nemet n'eo ket sur e vint komprenus d'an holl. Meus aon n'eo ket gwali nechet Koulizh gant-se. Siwazh ne voe ket roet tu dezhañ da gomz kalz, ret e oa selout sonerezh.

Ha da c'houde, Androo Ar Merser gant e lavr diwar-benn skridoù ofisiel e brezhoneg e-pad an dispac'h. Ra verr ar gaoz adarre. Sonerezh. Brav e vije bet goulnn e soñj gant Koulizh Kedez (hag ar re all). Buhezkeoc'h a galz e vije bet abadenn FR-inst.

Eus petra e oa deuet Gwlonvarc'h da gomz, ma n'eo ket eus Droudezh ha Kelled kozh? A-boan un tañva eus

danvez lonnuz e leviou a voe roet dimp. A-hend-all en em c'houlenñ da betra komz eus leviou gallec en abadenn vrezhonek. Gwir eo e vije tresetoc'h an danvez (donoc'h a se e c'hallec ar c'haozioù bezañ neuze ivez), ha feiz, ma ne vez ket kaoz eus al leviou brezhonek en abadennoù gallec FR-trosc'h, ne vez ket kaoz eus al leviou gallec diwar-benn ar seurt danvez ivez. Sonerezh eta.

Pedet e oa ivez Laurent Jouin, aktour ha kaner evit ur pezh skrivet gantañ, evit-doare "L'Emir de langueluan". E gallec moarvat. Gortoz a raen Favereau da c'houlen digantañ perak ne oa ket bet skrivet ar pezh e brezhoneg gant ur brezhoneger ken ampart. Met evit ober bruderezh e oa deuet Jouin moarvat ha n'eo ket evit respont d'ar c'houlennoù mat.

"Bimbo" a oa ar firdvradenn kinniget d'ar vugale, kalz gwelioch, d'am men, eget ar re a oa a-raok (met rat e vefe goulnn o soñj digant ar grouadurien), Kernoec'h ar moudiezhioù zoken, mouezh Kernaoc'h zoken, ya.

Echi eo an abadenn, edo ma gwaz ouzha ma gervel. Gouel an Tadoù, petra. Hag an danvez-tad. Met peoc'h!

Anna Kerlagadeg



Paol Skouarneg

# Kendalc'h Unvaniezh Demokratel Breizh e Naoned

**"Emañ ar jakobinelezh war he zalaroù"**

Europa, ur c'hañs evit Breizh! Sed ar pezh a zo bet lakaet anat e Naoned gant ar gendael aozet gant an UDB ar 16 a viz Mezheven. Dirak tost da 200 a dud, daoust d'an nebeud a vruderezh er c'helaouennoù bras, evel ma verkas Michel François, sekretour ar strollad breizhat, e teuas da gomz Bretoned anavezet mat met ivez tud eus pobloù all en Europa.

**Per-Yves Le Rhun**, kelenner douaroniezh e Skol-Veur Naoned, animatour "Ar Falz" ha difenner kalonek Naoned e Breizh, a zisplegas, ur wech c'hoazh, pouez adunvanidigezh ar Vro. An emrenerezh, gounezet da heul stourm ar CELIB a zo bevrennet gant

**Breizh unanet: ur pouez en Europa**  
Gant Bro Naoned e vefe gant ar rannvro ur milion a dud ouzhpenn er rannvro, da lavarout eo tost da bevar milion. Unan eus rannvroù pobletañ ar C'hwezhkorn e

Veur Breizh Uhel. Bezañ gouzañvet gwask ur republik jakobin, koulz en diabarzh hag en diavaez a zo bet un dicheañs. Met ivez bezañ degemeret ar galleg da yezh ar stad abaoe ar Rouantelezh. Gant an emsav, avat, eo bet adsavet ul lennegezh, dihonet ar



Per Rhun

gwander budjed ar rannvro, pouez an departamantoù ha rannidigezh Breizh. Piv 'zo da damall, ma n'eo ket, da gentañ, bourc'hizien Naoned, hag en o fenn **Abel Durand**, Prezidant Kuzul Meur Liger-Atlantel. Ar re-mañ a fell dezho ober eus Naoned kêr-benn "Breizh-brasañ", kêr-benn ur rannvro "Arvorig". E 1972 c'hoazh e oa kaoz ganto eus ur "rannvro ar c'hornog", pa voe savet ar rannvroù nevez (E.P.R.), daoust ma oa anat e oa tonket ar strategiezh-se da c'hwitañ: n'eo Naoned nemet kêr-benn daou zepartamant bennak dre ma 'z eus meur a benn disheñvel da Vreizh ha da Gornog Bro-C'hall.

vefe. Brasoc'h e vefe an nerzh pouezañ war Baris pe Vrussel. Aet e vefe buanoc'h war-raok hent an aberioù. Bro Naoned a vefe harpet war Vreizh ha pouez rouedad ar broioù bihan. Breizh a c'helle bezañ neuze maen-korn ar Wareg Atlantel: ne vo ket eus ar Wareg-se hep emglev etre Naoned ha Roazhon. Evit derc'hel e blas en Europa e vo ret bezañ frammet ha kenaozet mat-tre ha kenlabourat etre ar skolioù meur. Ar rouedadoù a vo stignet bremañ eo a ziazezo rannvroioù an arvor.

Rakwelout dazont sevenadur Breizh hag ar Brezhoneg a oa trevell **Francis Favereau**, kelenner e Skol

Vretoned c'hoant ganto "bevañ ha labourat er vro" asambles gant lusk sevenadurel ar bloavezhioù 70. "Gronnet eo mioch-mui en Europa ar vroadelouriezh jakobin bountet war he zoù pellañ. Rannvro hag Europa a ya a-unan aliesoc'h-aliesañ. An dañjerioù brasañ a zo oad ar vrezhonegerien ha stumm ar stad a chom dibleg, hag en un doare ispisial, an deskadurezh giz Trede Republik Gall."

**Dilez aozadur an tir... hag arakaat ar Vretoned**

Un dañjer all a zo bet lakaet war wel gant **Michel Philipponeau**: dilez kenaozadur an tir er Frans, "Dont a reer endro," emezañ, "da rak-

tresoù Delouvrier a rakjede c'hwezek milion a dud e Pariz. Toullañ a reer ar riboul dindan Mor Breizh hep studiañ an efedoù en araok. An holl a ra war-dro aozadur an tir: an SNCF da skouer." E bro-Bariz e toiper ar pemp skol uhel stag ouzh al labour-douar, e krouer peder skol-vour nevez. An emglevioù etre kêrioù hag ar Stad a zo da ziwall diouto ivez: 350 milion a lorioù a roio ar stad evit 8kilometr metro Roazhon, da lavarout eo mioch'heget

dre aer par da hini broioù hanternoz Europa. Dav eo meizañ mioch'c'hoazh omp stag ouzh ar mor". Ha menegiñ a ra Jules Verne a lavare: "ne reer netra a dalvoudigezh hep ur spidivent".

**Ar pobloù bihan a-unan**

Kadarnaet eo bet stourm ar Vretoned gant an dud a-ziavaez. Gant **Max Simeoni**, kuzulier rannvro Unvaniezh Pobl Gorsika ha kannad e parlamant Europa evit an

disoc'het e gwirionez war an impalaeriezh hag ar brefaded". Met un Europa dreist d'ar stadoù ha kevredadel a zo da vezañ savet evit derc'hel da liested ar pobloù hag ar sevenadurioù. Anez da-se ne vo nemet Europa an tennderioù.

**Vidas Reckys**, kelenner politikouriezh e Vilnius e Lituania a roas un testen eus stourm ar pobloù balt, daoust dezho bezañ niveroù bihan (2,7 milion a dud e Lituania,

Belgia. Ar gumniezh, avat, a zo pe Bobl Flandrez pe Bobl Walonia. Evit ar pezh a sell eus Brussel, daoust ma oa Flandrezat, ez eo bet degemeret gant Flandrez e vefe dezhi ur statud Europat ha liessevenadurel gwirioù ingal evit pep kumuniezh. Ewel-se ivez eo e c'hallio ar gêr derc'hel he fouez.

Ar gendael-se he deus diskouezet un doare kelaouiñ nevez evit an UDB en em ginidige evel strollad "kevredadel". Ar voest a zo alies ar pezh a laka da werzhañ ar marc'hadoù war ar marc'had a-vremañ. Hag evit stourm ouzh jakobinelezh ar stad-c'hall "prest da werzhañ Gwirioù Mab-Den en diavaez" e tiskouar ar strollad breizhat bezañ prest da emdreiñ hep nach, evit keloù-se, e baliou diaze.

T.L.



Dominique Maison, Yves Laine, Vidas Reckys (demograf Leton Riga) ha Nelly Maes, kannadez Flandrez eus ar Volksunie.

pezh a goust lakaet hent kreiz Breizh war bedar rouedenn.

Ha koulskoude, ar c'hendiviz-se en, deus diskouezet an arakaadennoù graet gant ar Vretoned dre o youl-stourm. "A-drugarez d'ar B.A.I." eme **Yves Laine**, Renner an Dioradur en embregerezh merdeñ savet gant peizanted Bro-Leon, "ez eo digor bremañ Breizh war ur boblad etre 80 ha 100 milion a dud. Met n'eo ket bet graet ar c'hard eus al labour. Ret eo sevel ur rouedad war vor ha

A.L.E. (Alliance Libre Européenne, UDB ezel anezhi), ez eo bet lakaet ar pouez war genskoazell ar pobloù savet e Breizh dija ur "c'huzul kenurzhiañ ar pobloù". Hiziv e vod an A.L.E. strolladoù rannvroelour, emrener pa broadelour en Europa. "E Bro-C'hall o deus bet da c'houzañv ar jakobinelezh, ur skouer giz-tremenet ha lakaet da dalvezout betek ar sotañ poent en diavaez. Ha touellet eur bet gant Gwirioù an Den a zo

1,6 milion en Estonia). Ar frankiz penn-da-benn a fell dezho, ha netra ken.

**Nelly Maes**, kannadez Flandrezat eus ar Volksunie e parlamant Belgia a roas ur gentel a bolitikerezh pleustrek: tamm ha tamm o deus Flandrez adc'hounezet o gwirioù hep en em gannañ dre ret war an dachenn ideologel. Daoust dezhi bezañ broadelourer Flandrezat eo gouest d'ober anv eus al "five broadel" pa gomz eus stad

## "LITUANIA EVEL KALEDONIA NEVEZ" eme Gorb

Pa oa bet Fañch Mitt e Moskou en doa laret Gorbatchov diwar-benn Lituania "e vije bet diskoumet ar gudenn dindan 24eur gant ur prezidant amerikan" dre hag. Diskleriet en doa ivez n'eo doa ket gallet ar C'hallaoued diskoulmañ dindan 10vloaz kudenn Kaledonia Nevez, tra ma kemere Fañch Kozh, en e gichen, un aer diseblant. Tamall a reas ivez Mikael Gorbatchov "an avanturourien" "a sach ar bobl war an hent fall".

# BREVED AR SKOLAJOU

Istor ha Geografiezh e Brezhoneg evit div skoliadez, daoust d'ar rektor.



Un notenn daoust da zivarregezh ar reizherien

Abaoe 1979, ar bloavezh ma oa bet degemeret Jil Killevere er vachelouriezh, ne oa ket bet skouerioù all a skolidi o tremen o arnodennoù e brezhoneg. Met bremañ e savo aliesoc'h aliesañ ar gudenn, gant skolidi Diwan met ivez gant reoù "klasoù divyezhek" an Deskadurezh-Stad.

Betek-hen, avat, e ra skouarn vouzar ar servijoù ofisiel. Ar respont a zo diazezet bepred war an hini a oa bet graet gant ministr an Deskadurezh d'un depute anvet **Xavier Deniau** e 1980: "n'eus lezenn ebet o reoliti implij yezh-mañ-yezh. Met evit an testennoù broadel ez eo anat hag hep douetañs e varner ar poelladennoù e galleg". Pelloc'h e lavare e oa moarvat ur vojenn e vije bet tremenet ar vachelouriezh gant unan bennak en ur yezh estreget ar galleg.

Eryll ha Kristenn o deus heuliet o deskadurezh en Istor ha Geografiezh e brezhoneg e skolaj Kermoyzan Kemper abaoe ar c'hwec'hvet klas. O c'helenner trede klas, an Itron **Leal**, he deus gouennet eta ouz ar rektor kinnig dezho poelladennoù ar breved e brezhoneg. Ur respont nac'h a zo bet, war zigarez "e ranke ar skolidi e klasoù divyezhek bezañ ken gouest da dremen o arnodennoù en div yezh ha ne oa ket aotreet implij ur yezh all estreget ar galleg evit an arnodennoù broadel".

Kement-se n'ec ket bet evit ober aon d'an div verc'h o doa divizet sevel o foelladennoù istor-geografiezh er yezh e oant bet boazet da studiañ abaoe meur a vloavezh ha goude bezañ heuliet skol kentañ derez Diwan e Kemper.

### Emgav dirak al lez-varn

Ouzhpenn-se ez eus gwirioù diazez gwarezet gant skridoù etrevroadel. gwir

ar gerent da zibab deskadurezh o bugale hervez mellad 26 Diskleriadur holivedel Gwirioù an Den, da skouer. Pe c'hoazh Emglev Gwarez Gwirioù an Den hag ar Frankizoù Diazez (2003/52) a c'houlenn en ur stagadenn e vefe graet gant ar Stad ar pezh zo ret da zoujañ ouz gwir ar gerent da skoliata o bugale hervez o c'hredennoù prederouriezhel. Bewech e vez resisaet ne vo graet gwallziforc'h ebet hervez ar yezh implijet gant an dud. Meneged eo bet c'hoazh skrid klozañ Kendiviz Viena, savet e Helsinki e framm ar C'hendiviz diwar-benn ar Surentez hag ar Chenlabour en Europa.

Dre vras e ranko kontañ daou vloaz bennak a raok kaout disentez al lez-varn. Neuze, ema o soñj ar gerent dougen klemm war ar prim evit ma vefe reizhet mat ar poelladennoù araok na ve kement ur diviz war an diazez e-unan.

### Galleg? Ma revr!

Gant Ministrerezh ar Gallegañ (pe ar Gallgarouriezh pe ar C'hallegeriezh?) ez eus bet embannet 40000 kartenn eus "ar bed galleg" evit ar skolioù kentañ derez. War ar c'harthennoù-se eo livet ar broioù, pe ar stadoù kentoc'h, gant livioù disheñvel hervez ma komzer eno galleg hepken pe galleg ha yezhoù all. E div Stad ne gomzer nemet galleg hervez kartennoù ar Ministr: Monako hag ar Stad C'hall. Hag asañtiñ a raio skolaerien Breizh kaout kartennoù a-seurt-se en o skolioù?

# STOURM ENEP GOUENNELOUR

## Ar Stad C'hall, kiriek da gresk ar Front National

E 1987 e oa bet savet ur C'huzul enep-gouennelour hag enep faskour gant strolladoù evel an UDB, PSU, MAN, SOS Racisme, Ar Falz, Emgann, Skol An Emsav, Ar Re C'hlas evit enebañ ouz kresk ar front National hag e vennoziou.

Gant darvoudoù ar mizioù diwezhañ e Bro-C'hall hag e Breizh (gwallegerezh sebelladurioù Carpentras, livadurioù e Naoned ha Kemper) eo bet roet lañs en-dro

d'ar c'homite-se a oa kousket e gwirionez. Ar skrid-diazez a zo bet adkempennet evit resisaat abegoù kresk ar Front National ha kiriegezhioù ar galoudoù gall.

Hervez ar strolladoù o deus sinet, UDB, "Alternative Rouge et Verte", Emgann, MAN, Skol an Emsav betek henn ez eo "youl diehan ar Stad C'hall, a-hed hec'h istor, da nac'hañ personnelezhioù diforc'h ar pobloù hag ar c'huminiezhioù, unan eus an abegoù ma

kav un degemer mat tezennoù gwallziforc'hañ ar Front National". Embann a reont a-hend-all ez eo kontrol a-gremm ideologiezh broadelour chaovin ha gouennelour luskad Le Pen da hini an emsav breizhek a zifenn an doujañs hag ar c'henskoazell etra ar pobloù. A-du int evit ma c'hellfe votiñ an estrenien er votadegoù lec'hel. Gouenn a reont erlin e vefe doujet da bersonnelezh ar vretonted, ha sevel a reont a-enep implij ar "Gwenn-ha-Du" gant tud eus strollad Le Pen.

## Pariz mut dirak an torfed

D'ar 15 a viz Ebrel 1989 e voe boureviet ha muntret ur Vreizhadez yaouank eus Gwipavaz e Bro-Salvador.

lazhet Madeleine. Ur c'hoar dezhi a nijas diouzhtu da Vro Salvador evit ma tistrofe ar c'horf da Vreizh hag evit gouzout muioc'h diwar-benn an darvoud.

penn an ospital a save ur rentañ-kont eus muntrou ar vreizhadez ha pevar den all eus an ospital.

Madeleine Lagadeg, 28 bloaz, klañvdiourez a-vicher, he doa labourer e-barzh ar "JOC", ar "Secours Populaire" hag ar c'h "Comite Amerique centrale" araok mont kuit eus Breizh evit ober war-dro poblañs Kreiz Amerika.



Goude chom ur pennad e Bro-Nikaragva e yeas da Vro Salvador, ur vro vihan eus ar paurañ en Amerika. Kerkent ma voe eruet eno en em stagas ouz ur ospital d'an Talbenn Farabundo Marti an Diebidigezh Vroadel (FMLN-Frente Farabundo Marti de Liberación Nacional). Gouzout a ouie a-dra-sur e oa arvarus al labour-mañ hogen marteze e krede dezhi he dije graet ar Stad C'hall un dra bennak ma c'hoarvezfe un taol fall dezhi.

Ne vo nemet gant ur bellgomzadenn a-berzh an FMLN e teuas he zud e Breizh da c'houzout e oa bet

Betek bremañ, n'eus bet heuliet ebet d'ar c'hlemm savet gant tud Madeleine Lagadeg. Evit komz resisoc'h, n'ha deus graet ar Stad C'hall an afer-mañ nemet lakaat ar c'horf da zont an-dro da Vreizh. Da lizhiri tud Madeleine Lagadeg n'en deus respontet Bernard Kouchner, ministr ar "Solidarite", nemet 6 miz war-lerc'h. Ur c'homite Madeleine Lagadeg" a zo bet savet e Breizh evit brudañ an afer. "Biskoazh n'hor beus klavet unan bennak eus ar gouarnamant gall o sevel e vouezh" emezo.

Gwelloc'h e ra ar Stad C'hall eta war-dro spierien-torfedourien an DGSE (ar priodoù Turenga, da skouer) eget war-dro unan bennak a labour evit ur bobl mac'het gant an impalaeriezh.

Gwenole Abloen

Korfekjadur: autopsie



# An torfed ankounac'haet



## SKRAPADEG 1942

**3500 bugel a oa bet kaset da gampoù ar marv gant ar C'hallaoued e Pithiviers e 1942**

N'eo nemet abaoe pennekentañ ar bloavezhioù 1970 e vezer krog da c'houzout eo gant ar polis gall e voe harzet yuzevien korn-bro Pariz, e 1942, ha dastumet eno er "Velodrome d'Hiver". 3118 gwaz, 5919 maouez ha 4115 bugel eo a voe harzet d'ar 16 ha d'ar 17 a viz Gouere. En holl 13152 a dud, bout yuzevien (eus Alamagn, Pologn, h.a.) o zorfed, eo a voe skrapet gant 4500 a boliserien c'hall. An Nazied, na c'hallent ket ober skrapadegoù bras e Bro-C'hall o-unan, o doa goulnet digant **Pierre Laval**, penn gouarnamant Vichy, e vefe graet al labour gant ar polis gall.

Kuzhet avat e oa chomet betek-hen ar pezh a c'hoarvezas goude skrapadeg ar "Vel-d'Hiv", ha dreist-holl d'ar vugale, a-raok enklask Eric

Conan embannet e niverenn 2025 ar sizhunieg gallek "L'Express" (Ebril 1990).

"Yuzevien 16 vloaz d'an nebeutañ" a c'houlenne an Nazied digant Vichy. Nec'het ar C'hallaoued: petra d'ober gant ar vugale hag o zud? 4992 yuzev, tud dizimez, pe koubladoù hep bugale, a oa bet kaset eus ar "Vel-d'Hiv" da gamp Drancy, da c'hortoz bezañ karget war trenioù o vont da Auschwitz.

O vezañ ma teue da vezañ dibosubl derc'hel an 8130 a dud a chome (familhoù gant bugale) evel-se e kreiz Kêr-Bariz e c'houlennas **Jean Leguay** digant an Alamaned e vefe sammet ar vugale ivez. Notenn gant an Dimezell Tavernier, eilerez sokial: "Krog eo ar Yuzevien da enebañ. Maouezed gant barradoù droug-sant, taerjenn. Bugale glañv. Privezhioù stanket Kann

ouzh ar boliserien. Fall ar spered. N'eo ket erru an nouilhez c'hoazh. N'eus ket dour. Na bara a-walc'h. Soubenn forzh da bet eur. Dau vedisin hepken. Glav e-barzh."

## ER C'HAMPOU GALL

Eus an 19 d'an 22 a viz Gouere e voe ambrouget 7618 a dud gant an archerien betek kampoù **Pithiviers** ha **Beaune-la-Rolande**, e departamant al Loiret. Savet e oa bet lochoù bras eno, e 1939, evit bac'hañ prizonidi-brezel alaman. Servijet o doa d'an Alamaned evit bac'hañ prizonidi-brezel gall, a-raok o c'has da Alamagn, hag adalek miz Mae 1941, d'ar C'hallaoued da graouiañ yuzevien eus Pologn a voe roet d'ar Reich evit lezel lech da familhoù ar "Vel-d'Hiv", deuet e-barzh bagonioù plomet.

Betek ar 16 a viz Gwengolo e voe dalc'het eno ar vugale diwezhañ. Gwashoc'h-gwashañ e vo o buhez, a zeiz da zeiz. Soñjal a ray an archerien lakaat muioc'h a orjal dreinek evit ma n'afe ket kuit ar babigoù, met reiñ tu dezho da zebriñ ne raint ket: ne oa mann da virviñ laezh d'ar vugale. Hervez un danevell-skrid eus ar 5 a viz Eost e oa krog lod da vervel a-benn neuze. Al laou, an derzhienn ruz, an difteriezh, ar red-kof gwadek a rae o reuz.

bugale. Kalet e voe taolioù an archerien da vare ar c'himidoù.

## TESTENIOU

**Joseph Weismann**, unan eus an daou vugel a zeuas a-benn da dac'hel eus kamp Beaune-la-Rolande, a oa 11 vloaz neuze: "Yudadennou-kened, evel n'em boa ket klevet biskoazh, laosket gant mammoù a ruihe war an douar, a skoe o fennoù ouzh

ar c'hamp, pa voe digoret a-greiz-holl, d'ur c'hamionad soudarded Alamaned, prest da dennañ warnomp. Galvet e gant bet gant komandant an archerien c'hall."

Goude an disparti e chome 1800 bugel bennak e Pithiviers ha 1500 all e Beaune. "Bugale yaouank-tre, 2, 3 pe 4 bloaz, a n'em gave o-unan a-daol trumm", eme **Annette Krajer**, 12 vloaz pa oa e Pithiviers.



René Bousquet (a-zehou) Sekretour Meur polis Vichy gant ofisourien SS.

René Bousquet, e Pariz hiziv, slou e goustañs ...

an douar. Hag ar vugale daoubennet, spontet-mik o klevout kement-se, a zirollle da yudal ivez, a staote e pep lech... Hiziv, bep gwech ma welan min hoc'h Le Pen o skignal e soñjan en estrenvan sportus bugale Beaune. Ha ne badan ket..."

Kontañ a ra an eil bugel, **Raymond Mann**, 15 vloaz neuze e kamp Beaune, e savas bec'h ha dispac'h pa voe klevet ar c'heloù. "E-pad ur pennad hor boa kredet e oamp o vont da treuzañ dour

D'an 13 a viz Eost, setu **Adolf Eichmann**, reter an aferioù yuzev er Gestapo o reiñ e al hag o c'houlenn ma vije kaset ar vugale da Alamagn. Da gamp Drancy, en hanternoz Pariz, e vint kaset da gentañ, hag eno e vint diwallet gant archerien c'hall. Ur c'hant bennak a voe laosket da vont er-maez, evel Anette Krajer. Met un 3500 a vugale tremenet dre ar "Vel-d'Hiv" a voe kaset da Auschwitz, ha kenkent d'ar c'hambrou-gaz.

Kendorfederezh

Ma ne chom netra e Pithiviers da zegas soñj eus merzheriadeg an 2000bugel a chomas eno e 1942 e c'haller gwelout, e bered Beaune, ur bez gant anv tri bugel, skrivet warnañ: "Victimes de la barbarie hitlérienne". Gevier bras: betek o analad diwezhañ e oant bet dindan pennadurezhioù gall!

Rak hep kenlabour ar C'hallaoued, prest da sentiñ ouzh an Nazied, ha da vont pelloc'h

Kenlabour entanet a voe gant afer ar vugale. Pa ne vezent ket goulnet gant an Nazied, pa oa **Darquier de Pellepols** (penngomiser an aferioù yuzev gant Vichy) o kinnig kas anezho da diezbugale, e c'houlennas **Jean Legay**, eiler Bousquet e Pariz, ma vefent sammet gant an Alamaned.

Kenlabour brav a voe gant archerien, gant polis, ha gant kargidi-uhel prefetioù Vichy a

tañ priz Roma". "Un delz, eme un itron eus Pithiviers, pa gan 14 vloaz, e oamp tremenet dirak ar c'hamp gant ar skot. Grik ne laras hon c'helenner diwar-benn an dud dal'het e-barzh". Hervez un itron all e veze klevet ar vugale hag o mammoù o yudal eus he zi. 500 metr eus ar c'hamp. Deuet e oa merc'hed eus ar vro da sikour ar warded da "furchal" ar brizonidi, ha da gemer diganto bizeier ha bravioù: lod a veze o rastellat e-barzh skid ar privezioù da



4.115 bugel Yuzev a voe kaset da gamp Pithiviers, ha war-lerc'h, ar re chomet bev, da gamp Auschwitz...

c'hoazh, ne vije ket deuet an Alamaned a-benn da zastum kement a yuzevien e Bro-C'hall.

Kenlabour gredus a voe gant **Rene Bousquet**, penn ar polis gall e 1942, a skrive d'ar jeneral **Oberg**, rener SS Pariz, d'an 18 a viz Even 1942: "Anaout a rit ar polis gall... Pa vo adsavet war diazezoù nevez e c'haller rentañ servijoù bras. Gwellet hoc'h eus pegen efedus eo. Sur on e c'hall ober muioc'h c'hoazh." Se a vo gwelet gant skrapadeg ar "Vel d'Hiv", prientet ma oa adalek an 10 a viz Even.

aoze an herzel, ar bac'hañ, hag ar c'has da Alamagn, o-unan.

Ne rae van, peurvuiañ, an dud ordinal, e Pariz koulz hag e Pithiviers pe e Beaune, ouzh merzherinti ar yuzevien. "Diseblant e vez an dud dre vras pa welont ar re harzet o-tremen", a skrive prefed al Loiret d'e vistri d'ar 1añ a viz Eost 1942. Gouzout a ouie eta an dud o chom en-dro d'ar c'hampoù petra a c'hoarvez e-barzh. Pouezusoc'h eget aesaat buhez an amezelen gaëzh a oa d'ober: "prenañ poltred ar marichal engravet gant an Ao. Gaudin, bet gan-

glask gwalinier pe troioù-brac'h, lod all a zraïthe an divskouarnioù en ur dennañ ar bizeier-skouarn pa ne vezent ket roet dezho buan a-walc'h.

Envor

"Diseblant ha dic'houvez a-walc'h eo ar re yaouank diwar-benn pezh a zo bet tremenet amañ", eme **Henry Berthier**, skolaer kozh ha maer nevez Pithiviers abaoe 1989. N'eo ket souezh, pa weler labour ar justis c'hall. Kenaoc'er skrapadeg ar "Vel d'Hiv", kengriek eta da blane-

denn ar vugale, e oa **Jean Legay**, marvet en e wele e miz Gouere 1989, tamallet, evit ar wech kentañ abaoe fin ar brezel, e 1979! Pa oa bet savet enklask prosez Barbie en ur ober 3 bloaz, ne oa ket bet a-walc'h gant 10 vloaz evit-tañ!

Jean Bousquet, rener polis Vichy ha mestr Jean Legay, a oa bet barnet e 1949, met n'eo ket evit bezañ roet 76000 yuzev d'an Alamaned, na bezañ kaset 4115 a vugale da Auschwitz: abalamour d'e garg e gouarnamant Vichy hepken. Met pardonet e vo dezhañ en abeg d'e "beroù a rezistañs". E 1944 e oa lec'het

gidi prefetioù Vichy, p'o doa darn anezho graet o lod evit sikour an Alamaned da gas da benn an "diskoulm diwezhañ", evel **Maurice Papon**, maer ha kannad RPR Saint-Amand-Monrond (Cher) eus 1968 da 1981, ministr Giscard e 1977, prefed ar Seine eus 1958 da 1967, hag a gasas e bolis d'ar vanifersterien aljerian e 1961 (meur a gant den lazhet, 11000 a dud harzet) ha da re Charonne e 1962 (9 den lazhet), a oa bet ken efedus evel pennekretour prefeti Bourdel e-pad ar brezel, evel ar c'houdavezh gant ar renad nevez, ma 'z eus hiziv meur a glemmer o tamall outañ "torfedoù a-enep an denelezh".



Papon, e 1958, Prefed Polis Pariz e-kichen De Gaulle

da Alamagn e karr ar jeneral SS Oberg hag eno e oa chomet da c'hortoz fin ar brezel, en ur genkiz, war lez al lenn Starnberger: "deportet", emezañ. Goude bezañ bet unan eus renerien ar "Banque d'Indochine" emañ hiziv war e leve e Pariz.

Tabou

Gouzout a ouzer hiziv en doa klasket **DeGaulle** adsevel ar stad c'hall e 1945 gant kar-

Anat eo ne fell ket da Vro-C'hall diskar mojenn veur ar bobl o stourm a-unan gant ar Resistañs er bloavezh m'emañ oc'h enoriñ ar jeneral DeGaulle, nag anavezout ar perzh bras he deus kemeret e-barzh ar ouennlazh.

D. Ar Gevell

Notenn: gouarnnizh = génocide

Bodadeg breizh enep-gouen-nelour hag enep-faskour

An aozadurioù ezel :

-a soñj dezho n'eo ket dre zegouezh nemetken ez adsav ar menozioù gouennelour ha peuzfaskour, kaset war-raok gant ar "Front National" hag enkorfet e Jean-Marie LePen. Ur gudenn diazev eus ar gevredigezh c'hall ez eo.

-a soñj dezho n'heller ket stourm hepken a-enep d'ar menozioù-se ur wech an amzer ha pep strollad diouzh e du;

-o deus divizet unvaniñ o nerzhioù evit lakaat asambles e Breizh an holl re a nac'h pep stumm a waskerezh hag a wall-ziforc'h hervez gouenn, stad kevredigezhel pe sevenadur an hiniennoù hag ar c'humuniezhoù;

-a nac'h da LePen pep gwir da glask treiñ war e du brogarantez ar Vretoned peurgetket dre implij ar "Gwenn-ha-du";

-a embann emañ ideologiezh vroadel chaovin ha gouennelour luskad LePen o vont a-enep d'an talvoudoù a gennvreudeuriezh etre ar pobloù a vez difennet gant emsaverien Vreizh;

-a wel emañ youl diehan ar Stad C'hall, a-hed hec'h istor, da nac'hañ personelezh diforc'h ar pobloù hag ar c'humuniezhoù, oc'h ober unan eus an abegoù ma kav un degemer mat tezennoù gwallziforc'hañ ar "Front National";

-a soñj dezho ez eo gwir da votiñ er mouezhiadegoù lec'hel evit an estrenien o chom er vro, ur soñj a gлот gant o menoz diwar-benn Gwirioù an den e doujañs an diforc'hioù;

-a zegas da soñj, evit Breizh, e talv doujañ d'an diforc'hioù kement hag anavezout ervat personelezh ar Vretoned gant ar Stad C'hall.

Sinet gant UDB, Emgann, AREV, Skol an Emsav, SOS Racisme 56, MAN.

# Kelenn hor yezh

## STUMDI

### Kelenn brezhoneg d'an dud deuet.

E 1986 e voe savet STUMDI(1) gant tud eus DIWAN. Tri den a zo o labourat er gevredigezh : ur rener, Padrig Merien, abaoe 1987, ur sekretourez, abaoe 1988, ur c'helenner war ar Brezhoneg abaoe miz genver 1990.

### Stummadur, labour ha dilabour

Degas sevenadur ha yezh Breizh e-barzh stummadur ar re a zo o labourat eo pal STUMDI. Daou hent a zo d'e dizhout :

Gwir o deus al labourerien da gaout ur stummadur paeet : ar "stummadur dibaouez" eo. Bez e kinnig STUMDI sizhuniadoù-studi, diwar-benn Breizh hag ar Brezhoneg.

Gant lod e vez dibabet ar prantadoù-se e-lec'h, lakaomp, ur staj bageal pe boderezh. Evit an darn vrasañ avat e talvez stajoù STUMDI da anavezout spisoc'h ar vro emaint o labourat enni ... hag evit.

Da sikour ar re zilaour da adkavout labour, pe da vroudañ ar stajoù da c'hoprañ tud, ez eo bet lakaet war-sav meur a staj, prantadoù stummadur paeet enno. A-drugarez d'an emglevioù-se e vez stummet ur bochad implijidi vrezhonegerien.

Bez e c'hell forzh piv, a-hend-all, kemer perzh war e gont e stajoù STUMDI. Nemet savet e vijent a-rotzh evit an embregerezh-mañ-embregerezh, ez eo digor ar sizhuniadoù-emstummañ d'an holl.

### Kelenn ar brezhoneg

Bep bloaz e vez aozet gant STUMDI un daouzek sizhunvez brezhoneg. Peadra da zatum skiant-prenet ... war an ezhommoù.

Evit evit kelenn d'ar vugale eo ret, evit pezh a sell ouzh stummadur ar re vras, azaasat kelennadurezh ar yezh ouzh an endro.

Petra a c'heller deskiñ d'ar stajidi pa vez berr an amzer, pa vez lies al

liveoù ? N'eo ket dianav ar c'hudennoù-se da gelennerien al liseoù hag ar skolioù. Ken diaes eo d'un implijad deskiñ brezhoneg, pa vez paket ar staj etre div sizhunvez labour, ha d'ar skoliad, pa vez enket ar gentel vrezhoneg etre kreistaiz hag un eur.

Pa vez hir ar stajoù, pa vez kemeret perzh e meur a staj gant tud 'zo, e ra diouer an hentennoù framm etit al liveoù-etre pe uhel. Ul labour dafariñ a zo da seveniñ. Anavezet eo ar gudenn-se gant mistri ar skolioù hag ar c'hlasoù divyezhek.

Bez emañ kelenn ar brezhoneg d'an dud deuet o tiwan. Ne daio ket fonnabl : mard eus degadoù a gelennerien hag a vistri o plediñ gant ar vugale hag ar grennarded, n'eus ken met un den gopret evit soursial ouzh stummadur ar re vras(2).

### Merañ ar stal

Bez e rank STUMDI, evel AN HERE pe AN OALED, merañ ar gounid hag an dispign. Ne venn ket bevañ diwar yalc'hadou. Ne dalvez ket ar re-se da baeañ ar goprou hogen da brenañ dafar evit diroen ar stal.

E stadoù Europa e skoazeller ar sevenadur. Sikour sevenadur Breizh a zo reizh. Arabat dezhañ, avat, pakañ "tro-spered ar re skoazeller". Lazhañ ennañ ar bev e vefe.

Evit STUMDI eo pouezus dibab ar goprañ hag ar merañ. Pa venn degas sevenadur Breizh d'an embregerezhioù eo dileet dezhi, evit bout komprenet ganto, pakañ spered un embregerezh, kaout doare ur stal a-vicher.

Setu 'ta glaouestre STUMDI : degas hor yezh hag hor sevenadur war tachenn al labour, e domani an ekonomiezh, diskouez, prouiñ zoken, e c'hell un embregerezh bevañ diwar nerzh hor sevenadur, diwar startijenn hor yezh hag, anat eo, diwar c'hoant deskiñ ar Vreizhiz.

Paskal Ar Marc'h

(1) STUMMadur Dibaouez  
(2) Ne ankounac'haan ket ar Skol-Veur, Me' I'gred din, avat, ez eo savet da gentañ evit ar re yaouank divicher, daoust m'eo bet kompennet evit ar re a labour (peligellenerezh, Rann ar Stummadur Dibaouez oc'h aozañ "crash-course" Roazhon.)

Herve Manach

# Kelenn hor yezh

## Capes 1991

Setu amañ al levrioù a vo da lenn evit priediñ ar C'hapes a-benn bloaz.

Evit al lodenn dre skrid e vo studiet :

"Tremenvan an Ytron Guerches Maria", embannet gant Roparz Hemon e-barzh "Trois poèmes en moyen-breton" (Dublin, Institute for Advanced Studies).

"Liv al labourer", gant Joakim Gwilhom (PREDER).

"Geotenn ar Werc'hez" gant Jakez Riou (Al Liamm pe Brud Nevez).

"Bilzig" gant Fañch Al Lae (Emgleo Breiz).

"Va zammig buhez" gant Jari Priel (Al Liamm).

Evit al lodenn dre gomz :

"War roudoù or misionerien", gant Visant Fave (Emgleo Breiz).

"Ur veaj e stadoù unanet an Amerik" gant Yves Mossac (Studi, niv 9).

"Abrobin" gant Yeun ar Gow (Al Liamm).

Hañvez studius d'ar genstriverien !

## KATALONIA

### CAPES Katalaneg : blev !

"E 1991 pe 1992, e c'halle bezañ aozet ar C'hapes Katalaneg", an deus diskliariet Jospin, ministr an Deskadurezh, d'ar sizhuniag Katalaneg "El Punt".

Ne vo ket aozet eta a-benn miz Gwengolo er bloaz-mañ evel ma krede lod, abaoe m'en doa laret Jospin e oa a-du gant ar C'hapes Katalaneg d'ar 25 a viz Ebrel, pa oa o respont d'ur goullenn graet er Gambr gant ar c'hannad Henri Siera.

A-du eo gant ar C'hapes, met n'eo ket prest d'e grouiñ !

## Labour frouezhus e Paris

Warlene 'oa bet diskouezet splann pegen efedus eo al labour kaset da benn gant K.B.D.P. (Kevredigezh ar Gelennerien war ar Brezhoneg en Deskadurezh Publik - Rannvro Bariz) ha pegen pennek eo izili ar gevredigezh.

### Disoc'hoù ar bloavezh-skol

Kentelioù brezhoneg a zo bet er bloaz-mañ en teir Akadademiezh (Paris, Versailles, Creteil) e div Skol-Veur (Paris III ha Paris VIII) hag eizh lise (Maudon, Plaisir, Massy, Nanterre, Enghien, Villemonble, Bufon, Voltaire).

Ret eo menegiñ en deus bet Serj RICHARD ur post klok (18 eurvezh) war bevar lise hag e oa bet entitlet evel A.E. brezhoneg daou vloaz a zo. Un trech eta.

An L.V. II (Teirvet yezh vez) a zo bet digoret er bloaz-mañ e Plaisir.

### Bachelouriezh

334 skoliad o deus bet tro da dremen an amprounnoù brezhoneg er Vachouriezh, ur c'hresk a 34% e-skoaz warlene (249 !). Pev ar rododenn a oa er bloaz-mañ, pa oamp tri warlene : Serj RICHARD, Laik AR GWENN, Mai DUPUY, Mark GUILLOU.

Dre ar mund, setu penaos eo bet rannet niver ar skoliad-mañ : 296 yezh diret, 3 B.TS, 12 bachelouriezh teknologel, 22 eilvet ha teirvet yezh vez hag 1 dre skrid.

## Ar yezhoù all, er bloaz-mañ

Korseg 42 skoliad, Katalaneg 23 skoliad, Elzaseg 5 skoliad, Euskareg 4 skoliad, Okitaneg 40 skoliad ha Tahisianeg 5 skoliad.

### Ar bloaz o tont

Klasket 'vo digeriñ kentelioù nevez dreist-holl e Pariz hag e Akademiezh Creteil.

Stajoù 'vo aozet evel boaz e Lille, Orléans ha Pariz. Setu deizadoù ar re-mañ :

Pariz : staj kentañ derez (Skol-Veur Pariz VIII) : 06/10, 07/10, 13/10, 14/10, 20/10, 21/10.

Pariz : eil staj kentañ derez (Skol-Veur pariz VIII) : 24/11, 25/11, 8/12, 9/12, 15/12, 16/12.


Bez 'vo ur staj kembraeg da vare miz Genver pe miz C'hwevrer.

Orléans : staj kentañ hag eil derez : 15/09, 16/09, 22/09, 23/09, 29/09, 30/09.

Lille : staj kentañ hag eil derez : 6/10, 7/10, 17/10, 18/10, 15/12, 16/12.

Mont a raio ar gevredigezh en darempred gant ar MAFPEN a-benn aozar ur staj evit ar gelennerien e Pariz.

Tu a zo menegiñ, kement a echuiñ ganti, ez eus un 10 bennak a stajidi (reoù Orléans ha Lille dreist-holl) o deus lakaet o anv evit an Deug brezhoneg.



# Sevel kleuzioù e Breizh hiziv an deiz



G : Gwelet em eus ac'hanout o sevel ur c'hleuz. Ne gavez ket ez aez un tammig re bell gant da vreizhadelezh ?

G : Daoust hag eñ e vez savet kleuzioù e Breizh hiziv-an-deiz, estreget ganit, evel just ?

war-lerc'h an digleuziañ evel m'eo bet graet, hag evel ma talc'her da ober.

R : Feiz, al labour "kleuziat", evel ma vez lavaret, peotramant "kæañ" ivez, n'eo ket ken ispisial-se deomp-ni, Bretoned, Estreget e Breizh e vez gwelet kleuzioù, setu kredapl bras int bet savet gant tud ar broioù-se. Kleuzioù a vez kavet e Breizh, met ivez er broioù keltiek all, ha pa vefent graet gant mein alies. Met e Normandi ivez, na pa ve ken, ez eus un tamm brav anezho, da vhanañ en tachadoù m'eo stummet o douaroù tamm-pe-damm evel re Vreizh.

R : Unanig bennak a vez, ha d'am soñj e vo muioc'h-mui, ha zoken e rankfe bezañ muioc'h c'hoazh hag evit meur a abeg. Ar pezh a zo pa welan kleuzioù nevez graet, lakomp abaoe dek vloaz 'zo bennak, e vezont graet gant komunioù pe gant tud prevez, morse gant labourerien douar. Padal eo ar re-mañ a rae an holl en amzer gwechall. Evit reiñ ur skwer resis, war un hent a zo bet graet etre Boharz ha Milizag n'eus ket pell, ez eus graet pep a gleuz en daou du. Graet divaivag a-walc'h, met kleuzioù memestra.

G : Perak 'ta, d'az soñj, ez eus bet freuzet kleuzioù a-vil-vern er bloavezhioù tremenet ?

R : N'eo ket diaes gouzout petra eo an abeg diavaesañ, anatañ : re vihan a-galz e oa an tachadoù douar labour, poent zo bet, ha mekanikoù brasoc'h-brasañ a vez implijet evit-se. Mont da eostlin m'iz war barkeier un hanter devezh arat gant ar mekanikoù 'zo en devezh a hiriv a vefe bet sot.

Met d'am soñj ez a pelloc'h ar jeu-se, a-galz, eget na weler diwar ar sellad kentañ. Ar freuzañ kleuzioù a zo bet evidon, unan eus meur a elfenn dispenn ar vreizhadelezh, dispenn perzhioù vat zispart ar vro-mañ, evit reiñ ar pennoù war-lerc'hiet-se a Vretoned d'en em deuziñ er patromoù kinniget gres dezho a gêr. Dre fent e lavaren o doa teknokratet ministerioù Pariz aon e teufe ar Vretoned da "chouanted", keit ha ma oa re a gleuzioù.

An dalc'h eo penaos, sistem na pet tra a zo bet a-viskoazh e-touez an dud, eo diaes empennañ heulidoù kement kammed war-raok a vez graet. D'am soñj ivez ez eus tud ne reont foute re kaer eus an efedoù-se. Ar bezanted kentañ o doa freuzet o c'hleuzioù, o doa bet gouidegezh vras er bloavezhioù kentañ, un tammig brav abalamour eod

G : Souezhus eo memestra gwelet un den o sevel kleuzioù an deiz a hiziv, hag e Bro-Leon ouzhpenn !

R : Souezhusoc'h e vefe ma vefe gwelet mekanikoù oc'h ober... Ha c'hoazh, klevet 'm eus ez eus graet e Kerne-Veur ur mekanik diouzh-se, rak du-hont, atav war am eus klevet, eo speredekoc'h an dud egedomp Bretoned, war ar poent-se da vhanañ : pa vez freuzet kleuzioù e vezont adgraset un tammig larkoc'h, war-lerc'h ledanaat an hent lakomp.

Pe neuze c'hoazh etre Gwipavaz ha Brest ez eus graet, tammigoù bihan a-walc'h met kleuzioù memestra.

G : Abalamour da betra 'poa lavaret bremaik e oa droch freuzañ kleuzioù ?

R : Ne lavaran ket eo droch dre ret dispenn kleuzioù, arfin, en devezh hiziv, yañ, e kavan ez eo... Un tammig ar memestra hag ar girzhier eo. Ne gavan ket sot dre ret o dizober met soñjal hiroc'h eget beg ar fri a vefe ranket ha, d'am soñj, ober kleuzioù all, e lec'hioù all, nebeutoc'h anezho marteze. Ar pezh a zo splann da neb a zigor e zoulagad pe a sell ouzh an douaroù labour, hep kaozeal eus braventez ar vro ouzhpenn, eo ez eus deuet un tammig brav a zistruj

# Pennad-kaoz gant Mikael Madeg

goudoret o douaroù gant kleuzioù an amezien. Setu ar re-mañ o deus graet do zo rag definded eo an dud atav tamm-pe-damm. Ha n'eo nemet war-lerc'h eo deuet war-wel gwall efedoù an digleuzierezh a zo bet.

G : Da betra e talvez ar c'hleuzioù gwechall, ha da betra e c'hellont talvezout hiriv an deiz ?

R : Er penn kentañ ne ouezomp ket mat a-walc'h perak e vezont graet. Ar pezh a vo sklaer avat eo da betra e servijent, da betra e soñj d'an dud e servijent, kentoc'h (ar pezh a zo un dra all), betek lakomp an eil brezel bed. Da gentañ e verkant an disparti etre domani an eil berchenn hag egile en un doare anat : e-lec'h ma oa bemial e oa aezik a-walc'h o diblasañ en un nozvezh, tra m'eo dibosubl gant ur c'hleuz. Da eil e servijent da zerc'hel ar chatal klozet un tu bennak, kuitvez dezho da vont da "laerzh". Da drede, e kalz lec'hioù, e servijent da gaout keuneud diwarro.

G : Daoust ha studiadennoù all a zo bet graet diwar-benn ar c'hleuzioù. War dachenn an etnologiezh kentoc'h.

R : Diwar-benn ar c'hleuzioù o-unan ne anavezan hini ebet. Ar pezh a zo sebezus kentañ pa soñjer pebezh lodenn a-bouez e oa betek n'eus ket pell eus personelezh Vreizh en he diavaesañ. Den, din da c'houzout, n'en deus graet enklaskoù, klasket na pa ve ken penaos e veze graet ar c'hleuzioù.

Diwar ar mare ma 'z eus en em gaved an orjal dreinek hag an tommañ dre c'hlaou, gaz ha tredan, e oa bihanaet kentañ o zalvoudegezh avat.

Pezh 'zo, servijout a raent ivez da draoù all ha n'halle ket an dud gwelet kalz dre n'hallent kent keñverañ gant ar pezh a vefe bet arak.

G : Da lare eo ?

R : Gwall efedoù a-fed an ekologiezh dre vras met ivez evit interest an tieg e-unan.

Breizh ez eus enni un tammig bras a zouarieier diskompaz ; ha war ar roc'h emaint, ha nebet a zonder douar alies. War-lerc'h "freuzañ" kleuzioù ez eus bet gwelet douar o "tiskenn", evel ma rae arak, pa veze glaveier bras. Arak e veze prizoniet gant ar c'hleuzioù. E skoaz bremañ ez eont er starioù, er c'harioù (beuzadeg kreiz-kêr Ventroutez...) hag er mor.

An dour ivez a veze prizoniet hag a chome kalz hiroc'h er vro, o silañ en douar e-lec'h o redak warnañ. Kalz bremañ. Hag ouzhpenn-se ar loenneier a zo bet dizouret ha graet douar labour ganto.

A-dreñv kein ar c'hleuzioù keuneudet e veze kalz goudoroc'h an trevadoù diouzh an avel, hep kontañ ar chatal (met piv a ra van outo ?). Studiadennoù

zo bet graet gant INRA Roazhon, a ouzon, hag a ziskouez eo bet diwezhatad ar poent-darevin e tachadoù, da skouer an Arvor : yenc'h e vez an amzer e-lec'h ma c'hwec'h kreñv an avel.

Ha traoù all c'hoazh : nebeutaet eo anaveled gouez ar vro, ha divalvat eo kentañ : na pet parrez a oa un dud poent 'zo bet hag a zo bremañ hervel ouzh beredoù rak, da droc'hañ kuit an avel, n'eus kavet tra speredekoc'h d'ober eget plantañ renkennoù gwezh siprez. Sotont adarre.

G : Daoust ha studiadennoù all a zo bet graet diwar-benn ar c'hleuzioù. War dachenn an etnologiezh kentoc'h.

R : Diwar-benn ar c'hleuzioù o-unan ne anavezan hini ebet. Ar pezh a zo sebezus kentañ pa soñjer pebezh lodenn a-bouez e oa betek n'eus ket pell eus personelezh Vreizh en he diavaesañ. Den, din da c'houzout, n'en deus graet enklaskoù, klasket na pa ve ken penaos e veze graet ar c'hleuzioù.

Un dra memestra : krogat eo evit meur abeg politikourien 'zo, abalamour da gudennoù an dour ha da glask sachañ muioc'h a douristed na pa ve ken, da vezañ kizidkizid war-se. Met ar pezh int krogat da erbediñ hapken, evel-se e Penn ar Bed da skwer, eo ober girzhier gwezh dizellus. Gwelloc'h eget siprez dija : brav evit al lagad ha gwelloc'h da droc'hañ an avel, met evit an dour ne reont ken ebet. D'am soñj eo ret ober kleuzioù keuneudet, gant gwezh dizellus ar vro.

G : Lakaomp em bele c'hoant da sevel ur c'hleuz du-mañ, penaos ober ?

R : Tremen hep ober ar faziou em eus me graet ! Ar pep wellañ d'am soñj eo sellet er vro tro-war-dro ouzh ar c'hleuzioù a chom : o ment, petra 'gaver warno a-fed keuneud. Ha neuze klask ha n'eus ket e-touez tud ar vro hag o dele savet kleuzioù o-unan, poent 'zo bet. Goulen diganto penaos. Me 'm oaa graet ar c'houzout : ober va c'hleuzioù da gentañ, kleuzioù bras, e-tro 200 metr hirdar dezho. Ha goude, pa 'moa gwelet n'ont ket deuet re vras ganin em boa klasket aliou. Dav eo bezañ speredek pa vezer e-touez tud na implijont ket kement-se o zamm spered na dreist-holl o skiant-vat, kea ! Anfin, ket, re bell ez o skiant-vat.

G : N'eus ket un doare diazez da sevel ar c'hleuzioù ?

R : Eo evel just, met meur a izdoare 'zo, hervez ar vro, da lavaret eo natur an douar, nerzh an avelioù, ha neuze an torosannadur dre-vras. Gouest on da lavaret evit al lec'h m'emaon o chom. Met netra nemet e Bro Leon e'ch anavezan pemp pe c'hwec'h seurt, rak krogat on d'ober enklaskerezh sistematik.

Pa vez c'hoant ober ur c'hleuz eo dav studiañ da gentañ ha danvez a-walc'h evit-se a zo : douar, mouded. Ha traouigoù all evel pelec'h ober anezhañ, pe stumm reiñ dezhañ. Evit ar poent n'eo ket diaes : graet a vez ar goañv rak ar poent glesañ er bloavezh e vez hag ur c'hleuz, da soñjal bezañ mat, a rank "pegañ" an eil tamm mouded ouzh ar re all. Ur pennad, hirik m'aus aon, em eus skrivet dija da zisplegañ resis penaos ober ur c'hleuz, da vhanañ ur c'hleuz douar tout, ha letomet, he doare Bro-Leon dre vras. Emic'hañ e vo embannet un tu bennak.

G : Daoust hag e c'hellez displegañ dre vras penaos sevel ur seurt kleuz, da c'hortoz ar pennad-se ?

R : Implijout ar skiant-vat hag an daouarn, ur forch da balat. Ret eo kompren kement-mañ : ur c'hleuz savet fall a blo hag ar pezh e laka da zisachañ eo an dour, war-ebon pe da vare an diskornañ. An dour a rank eta redag kull diouzh ar c'hleuz, arabat dezhañ mont e-barzh.

Savet e vez a-nebeudoù : lakaat kardedoù mouded, da lavaret eo kardedoù leton, gwizioù hag all, ha kargel a zouar etre an daou "vogar" a ra an diavaez. Ha moustrañ mat a-raok sevel ur guc'henn war-c'horre. Haga arabat, pa vez echu moustrañ, e vefe ur gluzenn e-kreiz. Ar c'houzout kentoc'h : diwar tout e rank bezañ un tammig stumm "gorre" ar c'hleuz diwar an traoñ, diwar an "estaj" kentañ. Ha moarvat beb a dammig bep tro ma saver un estaj nevez. Ha moustrañ mat. Ha pa vez echu eo ret eta e vefe diwar tout ar gorre. Hag a-raok plantañ gwezh gwal bloaz pe zaou, da welet ha savet mat eo, ha darc'hel a ra war-lerc'h bezañ goañvat. O, ul labour eo, Kontañ 'ran evit kement metrad kleuz echu du-mañ ez eus pemp pe c'hwec'h eurvezh labour.

G : Pemp pe c'hwec'h eurvezh labour hag a dalvez ur mintivez "jogging". Daoust hag a vefe tu, d'az soñj, sevel ur sport nevez (ha broad ouzhpenn) diwar ar sevel kleuzioù...

R : Ya, kea !

Faltazi

# Pa voe Soaz hec'h-unan



Evel just ne oa ket bet ken plaen-se an traoù ganti en he buhez.

Koulskoude e kave un tammig diaes bremañ en em gavout hec'h-unan, en he c'hoazez ouz an daol goad vras. Laret e oa bet dezhi alies avat e oa neuze e vije ar pep diaesañ, pa errije er gêr eus ar vered. Tremenet mat e oa an traoù, tremen mat a ra an traoù dalc'hat forzh penaos. Leun an iliz. Er vered e oa bet ret leuskel kement hini a oa er bourk da dostaat da boket dezhi. An hini gozh Droniou a oa aze ivez, pa ne veze ket gwelet ken abaoe bloaz da nebeutañ. Abaoe interamant Emili Derrien. Ha c'hoazh, daoust hag-eh e oa bet an interamant Emili Derrien ivez ? N'he doa ket soñj ken. Met gallout a rae Soaz larout anv kement hini a oa deuet hirie. Goneri sell, a lake he lenn da vezevennñ pa vezent o tañsal, daou-ugent vloaz zo bremañ. Se oa a-raok Sis. Sis gant e zaoulagad glas, Sis gant e rochedoù roudennet, Sis gant e gorn-butun kozh a oa bet roet dezhañ gant e dad hag en doa bet anezhañ gant e dad-kozh, emezañ... Ma, ar pep gwashañ hirie a oa bet degouezhout gant Madalen Kouzigou en un dont er-maez eus ar vered. Honnezh, gant he zri-ugent vloaz tremenet, a oa brepad harval ouz ur c'hast. Ha bez e oa unan, sur.


Sevel a reas Soaz. Bremañ e oa echu da vat. Poent e oa kas c'hwèzh ar marv diwar-dro an ti. Da gentañ ar boujiennoù. Ha goude ar c'hadorioù, stok-ha-stok a-hed ar gwele. Un tamm skubañ bremañ. Hag un taol-sell ouz al liorz, en un dremen. Feiz namn 'vat, ne oa ket aze ken, en e zaoulegoù, war-dro e legumaj, o sellout hag-eh e tave brav e biz bihan. Ne oa ket ahont, dindan an haleg, ivez. Na dindan ar wezenn-avalou, gant e banerad. Ya 'vat, prim e oa bet an traoù ganti Sis, abaoe an deiz m'en doa laret dezhi, en un dihuññ, e oa krog poull e galon d'ober poan dezhañ adarre. Kustum e oa koulskoude, abaoe pell zo. Memes tra en doa galvet ar medisn. Met hennezh a anavezze Sis re vat, ha ne oa ket nechet bras. Ha forzh penaos e oa krog da wellaat dezhañ... Teir sizhun goude e lake Soaz da douñ ne gasje ket anezhañ d'an ospital. Deuet e oa ar medisn adarre. Na gomprene ket, emezañ. Ne oa mann d'ober. Ha Sis war e wele, o winkal gant ar boan, ne baoueze ket da larout e'ch ae gwalc'h gantañ, e vije pareet a-benn an deiz war-lerc'h. Met pa veze e-unan ganti e lare dezhi n'en doa ket c'hoant da vervel en ospital. Gout a ouie, emezañ, e oa war e dalarioù, e oa echu e amzer. Ne oa ken 'met gwelet : koshoc'h evitañ a oa aet d'ar vered en e raok... Derc'hal e grog betek Gouel Yann en doa c'hoant d'ober. Ne lare ket, met goût 'walc'h ouie Soaz, ha n'he doa ket ezhomm klask pelloc'h. Achanta, Gouel Yann ebet n'en doa gwelet evit ar bloaz. Da noz e oa erru ar person. Ha marvet Sis an deiz war-lerc'h beure. Ar c'hleñved a zrañhe e vouzellou, a oa bet trech dezhañ. Piv a gavje da larout ?

Soaz n'he doa ket klevet anezhi o tegouezhout. Mari, goude bezañ lakat he dilhad da bemdez, a oa deuet da welout hag eh he doa ezhomm un dra bennak. Petra he dije bet ezhomm ivez 'ta ? Podin a reas anezhi da vont en he c'hoazez. Ha kaoz gante. Gant Mari bapred. Eus an interamant, evel just, eus ar re a oa o ouelañ, hag eus ar re all. Soaz avat ne selaoue ket nemeur. Sis ha hi ne oant ket eus ar gêr gwech ebet, koulz larout, ha keuz he devoa un tamm. E Lourdes da vihanañ e kanje bezañ bet. Tremen gant ar prosesionoù a veze gwelet e-barzh an televizion a oa bet ret dezhi ober. Ya, kare he doa Sis, abaoe ar penn Kentañ, pe dost. Kenkent ha ma oant dimezet e oa aet gantañ d'ar park, da sikour anezhañ. Met pell zo bremañ e oa aet he nerzh diganti. Chom a rae neuze da c'hortoz anezhañ er gêr, ober a rae kafe dezhañ d'he adleñ ha d'e

adverenn, hag e taole pled e vije berve. N'he doa ket ezhomm montr ebet 'vat. Gout a ouie pegoulez e veze da reiñ greun d'ar yer, ha d'ober koan. Gout a ouie pegoulez e'ch erve Sis er gêr. Ha Mari a zeue alies d'he gwelout. Dont a rae gant he stamm, ha gant kelouio eus ar bourk. Un deiz he doa laret dezhi, e-kreiz ar gaoc evel just, e kave dezhi he doa gwelet Sis gant Madalen Kouzigou a-drek an iliz. Meur a wech goude, e-pad un toullad mizioù, he doa degaset ar gaoc war se. Achanta, goude ur pennad n'he doa ket laret ken. A-benn neuze e ouie Soaz. Ne lare ger. A van da van e oa deuet da gustumiñ. Graet he doa he soñj tevel war se : grik ebet da Sis na da zen all ebet. Evel se e tifenne hec'h enor. Dalc'het e oa an traoù da vont er stumm-se betek an deiz ma oa manet Sis klaw, ken n'halle ket sevel diwar e wele ken. Ya, ugent vloaz e oa padet an traoù, ha n'he doa keuz nemet d'un dra, emezi : n'he doa ket bet a vugale. N'eo ket gaoc a lare. Se oa kaoz he doa kement a gâz ouz Madalen Kouzigou, rak hi he doa bet ur mab a oa ganet un tamm war-lerc'h marv e dad Remon Kouzigou, ur pezh pikol den bras, ken du e zaoulagad evel e vev, a oa bet diskaret en un ober ur sizhun bennak, gant ur c'hleñved spontus moarvat, den ne ouie. Mab Remon Kouzigou, bapred, ne oa ket anavezet e-barzh ar vro, peogwir e oa bet savet e Montroulez gant ur c'hoar d'e vamm. Un deiz, memes tra, se a oa un tamm a-raok ma oa manet Sis klaw, e oa bet gwelet e-barzh ar bourk : deuet e oa da welout e vamm. Eno e oa Mari, evel just, peogwir e vez dalc'hat e-lec'h ma vez un dra bennaok e'ch errou. Un tamm aer genaouek he doa kavet dezhañ, emezi, gant e zaoulagad glas-boull. Ken e oa daoubennet ar paour-kaezh Soaz gant ar c'helou.

Bremañ e oa aet Mari d'ar gêr. Noz e oa. Skaotañ a reas un toullad listri, torchañ anezho, ha goude, klenkañ ar pod-kafe gwenn ne servije ket ken, peogwir n'ave Soaz takenn kafe ebet. War-benn ar ganastell e lakeas anezhañ. Dindan an dar e oa podoù konfitur goull : tapout a reas anezhi. Da betra ober konfitur ken, pa oa podadoù e-leiz ar ganastell ? Tapout a reas un toullad tourchouerioù ivez, hag ur voestad kontamm-d'ar-razhed, tost goull. Ha hi mont betek an drezeg, e penn ar park a-drek an ti, da zarc'heñ ar pakad e oa o paouez ober. Ugent vloaz ne oa ket bet gwelet ur razi e-barzh an ti.

(Diwar ur gontadenn c'hallek gant **Pascal Merigeau**, kempennet gant **Mark Kerrain**)



## FESTIVAL DE CINEMA DE DOUARNENEZ peuples minorisés

### DEVEZHIOU-STUDI DIWAR-BENN BRO -BALESTINA

Evel er bloavezhioù a-raok e vo aozet devezhioù-studi da-gener Gouel Sinema ar Pbloù Minorelezh. Bez 'e vint dalc'het d'al lun 20 ha d'ar meurzh 21 a viz Eost e Ti ar Re Yaouank hag ar Sevenadur, 11 Bali Camille Réaud, 29174, DOUARNENEZ.

Danvez an divizoù (n'eo ket bet savet c'hoazh roll ar brezegennerien) :

- Istor Bro-Balestina (a-raok 1948 ; abaoe 1948)
- An emsav palestinian (penaos e vez frammet ; al liammoù gant ar broioù arabek)
- Stad an traoù er mare-mañ (ekonomiezh ; kevredigezh ; sevenadur ; kredennoù) hag an Emsavadeg (an "Intifida")
- An endro etrevroudele a-vremañ hag an dazont

Devezhioù hag eurvezhioù an divizoù :

D'al lun 20 a viz Eost : mintinvezh : 10e - 13e  
endervezh : 14e - 18e  
D'ar meurzh 21 a viz Eost : mintinvezh : 9e - 13e  
endervezh : 14e - 17e

\* Merenn a c'hello bezañ debret e-kichen lec'h Gouel ar Sinema.

### FOLLENN ENSKRIVAÑ

(da vezañ kaset da : DAOUAGAD BREIZH, 29 Straed ar Rozmeur, 29100 DOUARNENEZ)

PELLG : 98.92.97.23 / 98.92.09.21

Anv ..... Anv badez .....

Chomlec'h ..... (Pellgomz .....) )

A gemero perzh en devezhioù-studi diwar-benn Bro-Balestina

d'an 20 ha d'an 21 a viz Eost

A fell dezhañ kaout bod evit nvezh an 20 a viz Eost  ya  nann

(50 Lur a zo da baeañ en a-raok)

Ma respontit ya :  lojeiz a-stroll  kambr en un ostaleri

Paeañ a rit ar frejoù enskrivañ : 50 Lur (gant ur chekenn)

Respontit a-raok dibenn miz Gouere, ar buanañ ar gwellañ, peogwir ne vo ket ur beññ p'iaññ

Stagadenn da n° 106 Breman

10-14 Gouere 90



**Pevare Gouel  
KANN AL LOAR**

### KANN AL LOAR, GOUELIOU KELTIEK LANDERNE

*Petra eo "Kann al loar" ?*

Gouel sonerezh, c'hoariva, dañs hag arzoù Breizh eo. Kas war-raok an divyezhegezh ha reiñ lañs da oberennoù gwiziennet e sevenadur ar vro eo e bal.

Un diazez eo evit harpañ pep doare krouidigezh da ziwan. Ur gouel ar seurt-se ne vez ket gwelet e lech all e Bro-Leon.

*Peseurt krouidigezh a zo bet diskouezet dija da genver "Kann al Loar" ?*

Meur a bezh-c'hoari a zo bet diskouezet e gouelioù "Kann al Loar" evit ar wech kentañ :

"Gwragez" gant Remi Derrien e 1987, c'hoariet gant "Teatr Brezhoneg Penn ar Bed", "Kenavo

my Love" gant Strollad ar Vro Bagan, e 1987, "Kêr-Is Villiget" ha "Liberta", abadennoù tan-ha-kurun gant Strollad ar Vro Bagan e 1987 ha 1989.

Abadennoù sonerezh zo bet ivez : kanadegoù "War varc'h d'ar mor" ha "Kan evit ar paoch" gant Job an Irian ha Reun Abjean, e 1987 ha 1989, "War vevenn an teir bro hag an daou ved" gant Patrig Ewen e 1988.

*Piv a ra war-dro gouelioù "Kann al Loar" ?*

Ur gevredigezh hervez lezenn 1901, tud a youl vat o labourat enni, he deus krouet ar gouel e 1987 hag a gas an traoù en-dro bep bloaz. Tud eus Landerne hag ar parrezioù tro-dro a zo e-barzh.

*Ha dont a ra niverus an dud da gouelioù Kann al Loar ?*

Ya. Berzh o deus graet meur a abadenn e-kezh ar gouelioù tremenet : 2000 a dud da skouer, a oa deuet da anvestiñ ouzh "Liberta", gant Strollad ar Vro Bagan, ha 650 bugel evit abadennoù Gerard Delahaye ha Maxime Pilot, e 1988 ha 1989. Muioc'h mui a dud a zeu bep bloaz.

*Petra vo dañvez "Kann al Loar" e 1990 ?*

E 1990 e vo 5 devezh gouel (e-lec'h 4 e 1989), 1 devezh-pad evit ar vugale, 2 devezh sonerezh-ha-cholori e kêr, 1 nozvezh digreizennet e Roc'h-Morvan, 3 abadennoù c'hoariet evit ar wech kentañ : "Molite Lambda" gant Jean Kergist ; "Kanenn evit Marzhin" gant Jaanne-Nicolas Le Saout ha Thierry Bara, kanet gant Laz-Kanañ Sant Karanteg ; "Confluent", un abadenn sonerezh nevez penn-da-benn, gant Gilles Servat hag an Triskell o seniñ asambles ...

**BEP DAOU VIZ LENNIT**

**AL LANV**

59 hent Kerdronloù Vihan  
29000 Kemper

Koumanant bloaz : 100 lur  
Skoazell adalek 130 lur

# Teñzorioù Kolombia



preizhet gant Konkistadorien an Eldorado.

Salv ma c'hello pezhioù kaer ar sevenadurioù Tairona, Sinú, Quimbaya, Muisca, Tolima, Calima, Nariño an amzer wechall reñ deoc'h da anavezout ar pezh a voe an dud, an natur hag an nevel en unan eus ar rouezhusañ sevenadurezhioù zo bet.

Hevlene ez eus div vro o kenoazañ traoù gant mirdi an aour : Breizh e Kêr Daoulaz ha Japon e kêr Tokyo.

Kenderc'hel a ra an diskouezadeg-se gant raoù "En amzer ar Gelled", "Europa en oadvezh an arem", "Kurunennoù ar bed", "Teñzorioù an Atrusked". Hor chas a ray donoch en anaoudegezh mab-den hag e istor.

**Abati Daoulaz**  
21 sd an Iliz BP34  
29460 DAULAZ CEDEX  
98 25 84 39

Eurvezhioù : **10e-19e** (bemdez)  
Filmoù video diwar-benn an diskouezhadeg hag an abati  
Evit ar strolladoù 10 den (gant un emgav) : gweladenn gant komzoù.

Priz :

- 1 den : 30L,
- ur strollad 25L pep hini
- 1 bugel : 12L,
- ur strollad 10L pep hini.

Diskouezet e vo "Teñzorioù Kolombia" en Abati Daoulaz betek an 30 a viz Gwengolo, Abeg d'ober un droiad eno e-pad ho vakansoù.

touesk pezhioù ar mirdi pinvidik-mor-se, o deus kuitaet douar Kolombia evit ar wech kentañ.

Drezo e roet anaoudegezh gant ar sevenadurezh-veur-se a oa an aour eviti arouez an heol hag an nevel, hag a rae gantañ er ficherezh, en arouezioù ar reli hag el liderezh ... gant sevenadurioù o deus legadet dimp testenioù eus herezh arzel an denelezh a-raok dezho bezañ

Betek an 30 a viz Gwengolo neuze, gant skoazell "Mirdi an Aour" eus Bogotá, e vo kinniget ur paer a ziskouezadeg a-zivout Teñzorioù Kolombia. Pezhioù orfeberzh ha kent-spagnolat prierezh a ziskouezo pegen pinvidik e oa ar sevenadurioù-se etre 500 ha 1500 goude J.K.

Bez 'eo "Mirdi an Aour" e Bogotá, ar pinvidikañ mirdi an aour hag an orfeberzh er Bed a-bezh. Savet eo bet gant Bank Republik Kolombia e 1939. E pal kentañ a zo dastum ha saveteiñ ar pezhioù-labour aour kent-spagnolat a veze rastellet gant preizhaterien hag a echue en teuzlec'hioù goude.

Ouzhpenn 200 a draezhoù orfeberzh, prierezh ha danvezioù all, dibabet e-



"KANNADIG UGB", niv 21

E-leizh a zihelloù diwar-benn ar stourm renat gant ar gelennerien vrezhoneg en deskadurezh, e Naoned, e Pariz, e Redon, e skolioù katolik Penn-ar-Bed ...

UGB  
21 straed an Tier-Barn  
56000 GWENED

"DIV YEZH ER SKOL", niv 2

"Stummañ skolaerian divyezhek I" eme tud an APEEB, en o c'hazatenning rak n'eo ket a-walc'h an DEUG evit kas war-raok ar c'helenner er skolioù kentañ derez. Pennadoù diwar-benn klasoù divyezhek e Landerne, Lannuon ha Brech.

APEEB  
BP 2507  
35025 ROAZHON

Katalonia  
Gevelliñ

Goulennet en deus an aozadur Xarxa Cultural digant holl diez-kêr Katalonia ar C'hreisteiz da c'hevelliñ gant parrezioù eus an Hanternoz.

Aotre  
Anavezet eo bet an APA (Associació de Pares d'Alumnes) evel trede kevredigezh familhoù skoldi gant Ensallerezh Akademiezh Perpinyà, goude an FCPE hag ar PEEP.

## RELIJION

Buhez Oaled Sant Erwan e 1989

Setu amañ renta-kont buhez Oaled Sant Erwan evit ar bloaz tremenet. Dister e vo kavet an oberezh-se gant hini pe hini, marteze. Evelkent ez eo diziouerus seurt oberezh d'an neb a glask bevañ bemdez-Doue e brezhoneg. Ouzhpenn-se ez eo un nor digor evit lakaat an dud da anavezout traoù Breizh hag ar brezhoneg hag ur benveg mat da ober bruderezh gant ar milieroù a dud a dremen bep bloaz dirak gwitrin ar stal, straed Berthelot ...

Bevañ e brezhoneg

Aozet ez eus bet pamp kaozeadenn gant an oaled e 1989 : unan diwar-benn Poparz Hemon, gant Ivona Martin ; unan diwar-benn Bro-Skos ; unan diwar-benn stad ar brezhoneg (testenn gant Kerlenn) ; unan diwar-benn ar bruderezh gant Aziliz ; unan diwar-benn ar birch'hiradenn gant Sant Jakez Kompostella gant Alan Souffez. Ur veilhaedeg a zo bet ivez. A-hent-all ez eus bet aozet ur weladenn eus tiez-gwer ar stang Alar e brezhoneg.

OALD SANT ERWAN  
28 str Charles Berthelot  
29200 BREST  
Pg. 98 28 31 13

YANN-VARI PERROT ADARRE

Brest

Nac'het ez eus bet gant Ti-Kêr Brest ouzh "Oaled Sant Erwan", kelc'h kristen brezhoneg Brest, deiz-hal ur stand da Foar Vikaez dre an abeg m'o doa nac'het tennañ kuit skoudeñ Yann-Vari Perrot eus o stand bloaz zo.

Beaj da Flandrez

Eus an 23 d'ar 26 a viz Eost e vo "Devezhioù ar Brezhoneg" e Brugge (Bruges) ha Ieper (Ypres). Lec'h a chom er c'harr-boutin a yelo kuit eus Gwened d'an 23 a-bred. 600 lur gall ar mont-dont, bod ha boued. Evit gouzout hieroc'h pellegom da Dugdual Kalvez (97 45 45 17).

## ROUDOU

War riblenn va buhez e oa ur plac'h yaouank Etrezomp e savas ur garantez dinamm Kemeret he deus va dori, va c'halon, va spered Mont a reomp hon-dao abaoe a-gevret War riblenn va buhez e oa ur plac'h yaouank

War riblenn va buhez em eus dastumet gerioù A oa bet dilezet e-giz pa vefent pihou Doulu pounner ar goafv ganto em eus dispariet Tarzhañ a ra an nwezh-hañv e donig-don va spered War riblenn va buhez em eus dastumet gerioù

War riblenn va buhez an Ankou o c'hedal Porzhier diruez e toull-dor ar Bed all O wic'hañ dibaoez tre al loar hag an heol Torket eo hor beiz emgar da vont da goll War riblenn va buhez an Ankou o c'hedal

War riblenn va buhez kriadennoù dister Golbet tamm ha tamm gant pouzrenn an amzer War vont an hent bras e kroaz-hent an dispiz O selado diouz an noz brallañ Kleier Kêr Is War riblenn va buhez kriadennoù dister

War riblenn va buhez e fouzlec'hioù Kêr-Gaoch E klask merched DAHLUD bevañ diwar o c'horf Evel e strad ar mor war gwele an orged O kinnig peñseoù bet kant gwech saotret War riblenn va buhez e fouzlec'hioù Kêr-Gaoch

War riblenn va buhez e-kreiz satar ar bed E selado bugale dirak Tan an Oaled Kontadennoù ar Bobl pe rimadelloù Dre ma ne zeu ket Du-mañ gavier ar gwagennoù War riblenn va buhez e-kreiz satar ar bed

War riblenn va buhez Tud oclh en em sevel Bloasat korf ha spered, n'int ket vit tevel Antilhez, Korsika, Iwerzhon, Euskadi, C'hwil a oa ar perak eo bet drokuzhet GANDHI War riblenn va buhez Tud oclh en em sevel.


Vousenn gKERVALAN

**Lennit al liamm A**

Koumanant bloaz 150 lur  
(studierien, soudarded ha tud dilabour : 100 lur)

Skrivañ da : AL LIAMM  
16, straed des Fours à  
Chaux - 35400-St Malo-

# 13vet gouel Douarnenez



8 devezhiad filmoù, diviz ha gouel!

12-26 a viz Eost : Pobl Palestina

Feal d'e spered e kendalc'h Gouel Sinema Douarnenez gant e hent : lakaat ar Breizhiz hag ar re all da zizoloñ pobleù gwasket ar Bed a-drugarez d'ar benveg dispar ez eo ar sinema, an diskouezadegoù, an divizoù.

**Palestina hag ar Sinema**

Pobl Palestina hag ar sinema : 30 film faltazi ha kelfilm. An aozerien filmoù palestinian hag o flas e-touez ar sinema etrevroadel. Ur sell a-dost war oberennoù Michel KHELEIF hag Amos GITAI.

Ur sell a-dost war oberenn Alanis OBOMSAWIN, aozerez filmoù amerindian eus Bro-Ganada.

Ur sell war ar filmoù savet gant ar pobleù bet pedet ar festival abaoe 1978 (filmoù nevez savet).

Un dibab filmoù evit ar vugale hag ar grennarded.

Kenstrivadeg filmoù Pobleù Minorelezhed Europa.

Ur sell war ur bloavezhiaid filmoù ha video e Breizh.

A bep seurt tud a vo pedet, divizoù a vo ivez, diskouezadegoù ha sonerezh. (Gellout a ra ar roll-mañ bezañ cheñchet).

Gant ar pezh a vo kinniget d'an arvesterien e weler e vo er bloaz-mañ muioc'h a draoù c'hoazh : an dibab.

-> Ar c'henstrivadeg filmoù Pobleù Minorelezhed Europa.


-> Ur staj aozet evit ar re o devo c'hoant donaat o anaoudegezh eus ar Vro ha tud Palestina (gwelout ar follenn distag stagadenn da Vremañ evit Enskrivañ).

**Titouroù :**  
Erwan MOALIC  
98929723/98920921  
Douarnenez.

Ur priz d'ar film "Gwad kezeg"

Gant ar film brezhonek "Gwad kezeg" graet gant Padrig Harve ha Catherine Nedeleg ha produet gant ACAV Sant Kadou a oa et an eil priz en ur genstrivadeg etrevroadel en Okitania.

Ar film "Gwad kezeg" a oa bet graet e 1986 a zispleg doareoù ar saverien kezeg e Bro-Leon. Diskouezet e oa bet e miz Mae en *Aissa-sus-Vinhana*, e-kichen Lemojez, en ur genstrivadeg aozet gant an Institut d'Etudis Occitans (Skol-Uhel ar Studiù Okitanek) evit filmoù eus pobleù gwasket Europa.



Lennerien ger,

Siwazh, ne vo ket a c'helioù-kroaz ganin ar miz-mañ. Kalz labour am eus bet ha n'on ket deuet a-benn da sevel ur gael ar wech-mañ. Ouzhpenn-se, emaoñ o vont da cheñch labour, ha n'eo ket sur e c'hellin kavout amzer adalek miz Gwengolo evit kenderc'hel gant ar c'hoari. Gwellet 'vo 'ta. A galon,

Fulup ar C'hordroc'h

## MIZ EVEN 90

1	R	A	K	T	R	E	S	O	U	R
2	A	R	O	U	E	Z	I	N	T	I
3	D	E	V	E	Z	H	N	O		
4	E	M	I	L	O	L	E	N	T	
5	N	E	L	U	M	I	N			
6	E	R	G	E	M	E	N	E	G	
7	K	I	N	A	E	T	O			
8	K	I	N	V	I	E	N	N		
9	T	O	U	E	N	V	E	L		
10	T	U	N	U	E	N	N	K	E	

### NATUR

#### Olifant

Abalamour d'ar boikoterezh etrevroadel a-enep da werzh an olifant e chom tonelladoù a skifoù kizellet e bro-Sina. Abaoe ar bloavezh 1980 ez enporzh ar vro-se tro 50 tonell a olifant bep bloaz hag ez ezhporzh kement ha 7,2 milion dollar S.U. a zelwennougoù.

Divizet e oa bet boikotit kenwerzh an danvez prizioù-se gant an "Diviz Etrevroadel a-zivout kenwerzh ar gouennoù en argoll" e Lausanne nav miz zo. Kandi Bro-Sina o doa kinniget ober an diforc'h etre Afrika ar Reter e-lec'h m'emañ an olifanted en argoll hag Afrika ar C'hreisteiz e-lec'h ma vefe tu da ganderc'hel gant ar c'henwerzh.

En deiz a hiziv e c'houlenn kizellerien olifant Bro-Sina skoazell digant ar Stad. Gortoz a raont ma vo kresket ar priz war an delwennoù dre ma vez rouesochrouasañ an danvez diaoz.

Thorel



## BEZ' EMAÑ DIWAN O KLASK

Renar war ar C'helenn Stummer  
Kuzulier war ar C'helenn Kelennerien er Skolaj Skolaelien (gopr skoul D.S.)  
Danvez Skolaelien (stummadur gopret)  
Sekretour(ez)

Kas ul lizher hag ur C.V. da  
DIWAN  
B.P. 22  
29870 LANNILIZ  
98 04 05 42

### SKOLAJ DIWAN ROPARZ HEMON

a glask  
KELENNERIEN

ISTOR-DOUARONIEZH (post 1/2 amzer)  
GALLEG (post 1/2 amzer) (anaoudegezh brezhoneg dre gomz)

ur c'helenner da reiñ 4,5 c'hentel war  
SKIANTOU AN NATUR ur c'helenner da reiñ 4 c'hentel war an  
ALAMANEG ur c'helenner war un hanter bost  
MATEMATIK

1 SEKRETOUR(EZ) (1/2 bost)  
1 ANIMATOUR(EZ) (1/2 amzer)

Kas ul lizher hag ur C.V. da  
ZDIWAN  
Servij an Implijidi  
BP 22  
29870 LANNILIZ  
Pell. 98 04 05 45

MALLUS TRE EO!

BREMAN NIVERENN AN HAñV  
106/107  
GOUERE-EOST 1990

### TAOLENN

Lizhiri.....	2
Justis evit DIWAN.....	3
Prezegenn Y. Bodenneg.....	4
Gouel bloaz Diwan.....	5
Gouel ar Brezhoneg.....	6
Gouel Broadel.....	7
Kuzulioù Sevenadurel.....	8
Skinwel-skingomz.....	9
UDB e Naoned.....	10
	11
Breved e Brezhoneg.....	12
Gouennelouriezh.....	13
An Torfed tavet.....	13
Torfed ankounac'haet.....	14
	15
	16
	17
Kelenn hor yezh.....	18
	19
Ar c'hleuzioù.....	20
	21
Kontadenn an Hañv.....	22
Kann al Loar.....	23
Diskouezadeg.....	24
Keleier Breizh.....	25
Festival Douarnenez.....	26
Kemennadennoù.....	27
Gouelioù.....	28
Pennadoù gant B. Tangi, Gw. Caradec, Youn Bodenneg, E-lena Riou, P. Vari Kerlorc'h Brieg ar Menn, Lena Louarn, K.S.B., Anna Kerlagadeg, Paol Skouarneg, Daniel ar Gevell, T.L., Hervé Manac'h, Gwenole Abloen, M. Kerrain, Fulup Oillo, Youenn Kervalan, Gouled st Erwan, AVC, Thorel, Fulup ar C'hordroc'h, Iwan Kadored, P. ar Marc'heg, KBDP	
Maketenn savet gant Nolwenn Louarn, Jean-Michel Roynard Lena Louarn Tremeur Louarn.	
Luc'hskeudennoù gant L'Express, Le Nouvel Observateur, Nolwenn Louarn, Noel Laine, O.F., Abati Doualaz, F. Oillo, Lena Louarn.	
Tresadennoù Mikael Baudu ha Malo Louarn.	
Renerezh BREMAN Lena Louarn	
Moulet e ti OSCR Roazhon	



# deiziataer an hañv e Breizh

## Gouelioù

### E miz Gouere

Eus an 30 a viz Mezheven betek ar 7: "FESTIVAL DES TOMBEES DE LA NUIT", e ROAZHON...

Eus ar 4 d'an 8: "FESTIVAL DES ARTS TRADITIONNELS" e NAONED.

Eus an 10 d'ar 14: KANN AL LOAR, e LANDERNE.

Eus ar 16 d'an 22: "FESTIVAL DE CORNOUAILLE" (Gouelioù Kerne gwechall, a-hervez) e KEMPER. Gant DEN, DAVY SPILLANE, ALAN STIVELL, MORY KANTE.



### E miz Eost

Eus ar Gwener 3 d'ar Sul 5: "Tregor en fête", e Landreger. C'hoarioù kozh, sonerezh, c'hoariva ...

Eus an 3 d'an 12: FESTIVAL INTERCELTIQUE AN ORIENT.

Eus an 10 d'ar 15: FESTIVAL DES DANSES POPULAIRES er C'HASTELL-NEVEZ.

Eus ar 14 d'an 19: FESTIVAL DE LA DANSE BRETONNE e GWENGAMP.

Na zisoñjit ket mont da welet d'an

**10 a viz EOST**  
e kêr Pont'n Abad,  
"Anjela Duval",  
un abadenn-dañs  
gouestlet  
da vuhez Anjela Duval  
e "Traoù an Dour"



## Devezhioù-studi

### Brezhoneg

KEAV, e SKAER: eus ar Sul 15 d'ar Sadorn 21 a viz Gouere; eus ar Sul 22 d'ar Sadorn 28 a viz Gouere: studi ha c'hoari: lennegezh, kan, sport ...

"Studiañ an anvioù" gant Mikael Madeg d'ar Sadorn 14 a viz Gouere, e Landerne.

STUMDI, en Orient: eus al Lun 30 a viz Gouere d'ar Sadorn 4 a viz Eost (devezhioù-studi all a vo gant Stumdi e dibenn miz gwengolo e KEMPER, e derou miz Here e KEMPERLE, hag e dibenn miz Here er CHAPEL NEVEZ hag e TREGLOU).

Titour: **STUMDI BP 22 29870 Treglonou 98 04 08 31.**

AN OALD: stajoù a bep seurt, a bep live, evit AN HOLL! 29214 Treglonou, PGZ 98 04 07 04.

AR FALZ eus an 31 a viz Eost d'ar 5 a viz Gwengolo, e Kiberen.

Dibenn miz Gwengolo: Kemper (1 sizhunvez). Derou miz Here: Kemperle (un dibenn sizhun). 22/26 a viz Here: Chapel Nevez. 29 a viz Here/2 a viz Du: Treglonou.

### E Galleg Istor Breizh

Eus al Lun 23 a viz Gouere d'ar Sadorn 28, er Greizenn AMZER NEVEZ e Plañvour, diwar-benn kendraouriezh Vreizh, eus oadvezh ar maen d'ar Grennamzer gant an Ao.Ao. Briard, Mennier, h.a.

Ar FESTIVAL DE CORNOUAILLE eus al Lun 16 d'ar Gwener 20, e skol al Likes.

## Diskouezadegoù

Taolenoù Robert MORVAN LE GUEDES diwar-benn Iwerzhon ha Breizh, a-hed miz Gouere ha miz Eost, er stal "Ar Bed Keltiek", bali Clemenceau e Brest.

7vet diskouezadeg-levrioù diwar "Rin, Arouez ha kelted", e Brasparzh, d'an 13, 14 ha 15 a viz Gouere.

En Abati Daoulas: "Teñzorioù Kolombia", a-hed an hañv.

ADKOUAMANANTIT  
DA V-

bremañ

150 lur ar bloaz  
(Breizh ha Bro c'hall)

broioù all: 200 lur  
skoazell: adalek 200 lur

